

B. VILLENEUFVE

Santez Koupaia

MISTER EN 4 ARVEST
GANT EUL LID-ENOR

Displeget e Gouel STROLLAD BREIZ
Landreger, 20 a viz Gwengolo 1928

LAKET E BREZONEG
GANT E. AR MOAL, RENER AR GELAOUENN BREIZ

GWENGAMP
MOULEREZ TOULLEC

—
1928

B. VILLENEUFVE

Santez Koupaia

MISTER EN 4 ARVEST
GANT EUL LID-ENOR

Displeget e Gouel STROLLAD BREIZ
Landreger, 20 a viz Gwengolo 1928

LAKET E BREZONEG
GANT E. AR MOAL, RENER AR GELAOUENN 'BREIZ

GWENGAMP
MOULEREZ TOULLEC

—
1928

EVÊCHÉ
DE
ST-BRIEUC & TRÉGUIER

Saint-Brieuc, le 4 Septembre 1928

Mademoiselle,

*Après avoir lu votre manuscrit, je
m'empresse de vous le renvoyer avec mes
remerciements, mes très vives félicita-
tions et l'Imprimatur.*

*Daignez agréer, Mademoiselle, mes
hommages respectueux en N. S.*

H. TRÉHIOU.

Da gristenien vat Landreger ha Langoat,
e kinnigan ar mister-man.

B. VILLENEUFVE.

Eur ger bennak d'al lenner

An Arvorig a voe peure'honzet gant Kezar, er blâ 58 arôk done-
digez Hon Zalver, goude ma voe bet trec'het Gwenediz war vor. An
Arvoridi ne zalc'hjont ket da enebi; Rom a leze gante lod eus o frankiz
hag a zigase d'ê pep seurt gwellaennou; sevel a rejont kêriou, ha
toulan etreze, ha betek ar mor, henchou ledan ha kompez.

Met adatek an III^{et} kantved, poblou goue ar Jermani a ziruilhas
war bro Galia hag a deuas betek an Arvorig, o listrujan pep tra war
o hent Epad daon-e'hant vîd, Alaned ha Sôzon e reas d'ar vro gwasan
m'hallent, ma renkas an dul klask repu er c'hoajou.

E tu all d'ar mor, enezenn vras Breiz-Veur, bet ive dindan galloud
ar Romaned, a c'houzanne kemend all. Adatek neuze, eo en em lakas
Breiziz da gitaat o bro ha da ziskenn en Arvor, o tigas gante ar fe
gristen o dou digemeret aboue an trede kantved.

E penn kentan ar VI^{et} kantved, ar roue Kerdik, gant e Sôzon, a
wallas adarre an enezenn. Etouez ar Vretoned a zeuas neuze d'an Arvor
(520-530), e oa Pompaia, a hawomp ni Koupaia. C'hoar e oa da
Rineall; bean oa eta eus a wad rouane an Doumone; he mab Tual
hag he merc'h Seva a oa ouz he heul hag ive eun intañnez kristen, he
hano Malhelew.

Mar d'eo bet skrivet, e hir gomzou, buhe S. Tual, hini Santez
Koupaia ne zo diouti nemet ter linenn.

Diskenn a reas gant he mab e Bro-Leon, ha dont gantan betek
Traon-Treger, elec'h ma savas eur peniti, demdost d'e abati. Eno eo
kredabl e vareas, rak iliz Langoat he deus miret he be.

Ter linenn; nebeudik eo 'vit disklêrian eur vuhe a-bez; awalc'h,
koulskoude, 'vit gallout ober ganti tolenn greiz ar mister-man, en eur
vodan endro da Goupain tud hec'h amter, gwerage, pesketacrien, klas-
kerien, mësacrien; awalc'h 'vit gallout, zoken, digas war bale an
drouized.

Aman, marteze, 'eo kaveet da rebech d'in am eus roet lamm d'an

istor o lakaat Koupaia da ziskenn en Arvor, er Yeodet, warlerc'h he mab. Kement-se, es eo kompren, n'eo nemet evit dresan ma danevell.

Goût ouzomp ive penôs an drouized n'eus ken komzou anê adatek fin an trede kantved. Mar reomp d'é 'n em diskoue e IVet t6lenn ar mister eo abalamour rei da intent gwelloc'h ar c'hrog a voe etre ar falz kredennoù hag ar gwir relijion.

Ha neuze, daoust hag-en n'eus ket digare awalc'h da gredi 'zo bet 'n em gavet, en amzer Tual ha Koupaia, eun drouiz bennak c'hoaz, bet 'n em repuet dindan dervennoù bras Brekilien?

Sal e teufe an t6lennou-man, bep ma voint dispaket, da lakaat da advevan amzerioù koz hon Bro ha da neveaal er c'halonou ar c'hoant miret diñtach ar c'hredennoù kristen hag ar garante vras dleat d'hon Zent koz.

Ra lavaro an holl gant an hevelep mouez hag an hevelep kalon :

Fe hon Tud koz, o Fe santel,
C'houi vo bepred Fe Breiz-Izel!
Nac'h hon Doue ? Kentoc'h mervel !

SANTEZ KOUPAIA

Mister en 4 Arvest, gant eul lid-enor (Apothéose)

KENTAN TOLENN

Koupaia o tigouezout en Arvorig

ROLL AR C'HOARIERIEN :

TUAL,
LAOUENAN,
KONAN,
MERIADEG,
MORVAN,
LOUARN,
BROG,

} Pesketaerien.

KOUPAIA, mamm Tual,
SEVA, merc'h Koupaia,
BRAN-DU, sorserez, a westl an dud,

Mitizien (peder) d'ar brinsez Adevisia, merc'h Derok, roue au Donnone

KENTAN TOLENN : Dirak an daoulagad, eur c'horn eus an ôd goue, e kichen ar Yeodet. — A-drenv, ar mor gwelet dre eun troc'h en moger uhel an tevenn.

DIVIZ I

KONAN, MERIADEG

Konan, gant ar c'hrog a zo en e zorn, a zav, o vont gorrek dre an tréz, ar pakajou bizin deut da heul al lano. Meriadeg, eur c'hrog gantan ive, a chom harp ouz ar garreg, o sellet talarek war-zu ar mor.

KONAN, o chom a-zav. — Netra ! Netra ! Aboue tarz an de, ec'h on aman o c'houiteta ! Bet eo ma fri ha ma c'hrog e

kement toull a zo dindan ar rec'hel, ha foeltr seurt n'am eus kavet ! Paz eur munut-tra ! Lâret a rafe an den penôs, aboue m'eo deut an divroïdi-se aman eus an Enezenn vras, ar mor, et droug ennan, n' houl ken rei begad ebet d'imp !

MERIADEG. — Ha koulskoude, hep lâret gaou, an avel a yude fenoz, 'vel pa vije bet holl bleidi ru Brekillen, klanvaet gant an naon, o redek war hön ôchou... Hag avel ar steren a wente 'trezek an ôd.

KONAN. — Ha nag e raje, mar 'zo eur galloud bennak, trec'h da hini ar gorventenn, o tifenn listri ha bagiou.

MERIADEG. — Koulskoude, Bleiz, 'vit gwignal d'al listri ha jachan anê war ar gerreg, en devoa staget goleier ouz kerniou e ejened. Gwelet e vezent, ac'han, o vont hag o tont e lein al lanneg, evel pa vijent bet o havreat eur gozenn bennak...

KONAN, o tiskouez ar mor a-bell. — Ha du-hont, en enezen-nou, ar goleier a zanse ive ouz kerniou saoud Penguey.

MERIADEG. — Ar renk kentan, te 'oar, 'zo gant pôtred an enezennoù. An tamm kentan 'zo d'ê !

KONAN. — Paz muioc'h 'vit d'imp ! Meur, pesketaer koz an Enezenn-Vras, a lâre d'in ne digouee netra gantê nemet tagosou diswriennet gant an dour, ha deut d'ar mor, da heul red ar stêriou.

DIVIZ II

AN HEVELEP RE, LOUARN, *eur baner pesketaer ouz e zorn*

LOUARN. — Goût a rez. Konan, petra' he deus kavet Bran-du, Sorserez Roc'h-Velen, an hini a anave ar gwellan, dre aman, kement toull ha kement kleuzenn a zo er gerreg ha kement pleg a ra ar mor ?

KONAN. — Eur c'houfr leun a aour ?

MERIADEG. — Eur podad chufere ?

LOUARN, o c'hoarzin. — Relegou koz azen ar Barzig koz !...

MERIADEG. — A oa en em veuet gant an tôl amzer diwezan, en eur stlejan eur garg bizin war an ôd ?

LOUARN. — Just awalc'h !

KONAN, faëus. — Me 'lez ma lod gant eun all !

MERIADEG. — Setu eno, mignoned ! Ar chans a zo tec'het kuit hag an naon a zo deut d'an druilh. O tiskouez eur d'horn plat eus ar roc'hel. Set' aman eur skaon grêt gant an doueou. *Azezan 'ra ha tennan eur restad bara du eus e zac'h. Grêt eveldon ! Shei 'ra e zent en tamm kreun.*

LOUARN, oc'h ober eveltan. — An doueou e tisplij d'ê ar relijion neve a deu d'ober gaou ouz o hini, hag e tôlont o droug warnomp !

KONAN. — Sotoc'h a ze int ! Gwell vije d'ê'n em gemer ouz ar re a zilez o servij hag a ya da heuilh an Doue deut eus enezenn Breiz-Veur.

MERIADEG. — Hag e zo eus ar re-ze muioc'h 'vit ne zonzjer ! Ha gant-se, kredet pe ne gredet ket, Brog a zo bet ive o chilaou Tual o prezek ouz troad menhir Krec'h-Uhel, 'tec'h en deus grêt e chomaj, eul lochenn toët gant frankou

LOUARN. — Koulskoude Brog n'eo nag eur penn-avelet nag eun den berboellik !...

MERIADEG. — Kement a ya da glevet Tual a ve troet gantan ; gant e deod, e sorz an dud. Kalz a ya war e lerc'h hag a zaoulin dirak an tammou koad kroaziet a lak 'no zav war lein hon meinhir. Met setu Brog, pa gomzer anean !

DIVIZ III

AN HEVELEP RE, BROG, *a stlej war e lerc'heur c'houezigell*

KONAN. — Ac'hanta, komper Brog, grêt 'teus tro vat fete ?

BROG. — Ya da ! Ar goz c'houezigell-man, ha hi krewet ! C'houez ebet zoken, ganti, eus ar gwin Jermani a dle bean bet ebarz...

MERIADEG, *da Vrog, o skei war e skoa.* — Lâr 'ta ne teus ket gouveet en em dibab ! Dont a rez da vean didalve, komper Brog !

BROG, *da Veriadeg* — Gwir a lârez, Meriadeg, kosaat a ran...

MERIADEG. — Ne vez ket gwelet, ken stank ha gwe-chall, o vont war da vag, a-benn d'an avel ha d'ar mor, da redek warlerc'h ar meilhed...

BROG. — Pouez an oad 'zo pounneroc'h war ma choug hirie 'vit ne oa dec'h.

LOUARN. — Marvat, evel war hini ar re-all !. Lâr 'ta, kentoc'h, eo Tualen deus sorc'hennet ac'hanout gant e gomzou touellus, evel ma ve tapet ar pesk gant eun higenn boëtaet mat. Kuitaet 'teus ar mor ha setu te, 'vel eun troc'her buzug, èt da zeski gant pôtr Breiz hadan ed hag ober bara gwenn.

BROG, *garo.* — Ha mar plij ze d'in, Louarn ! Daoust hag-en n'hallin ket mont, pa garin, da chilaou komzou furoc'h 'vit da re ?

LOUARN. — Ar c'homzou a zo diouz ma ve genou ar prezeger ha diskouarn ar selaouer, ha da ziskouarn te...

BROG, *o vont da Louarn hag o sellet outan e gwennou e zaoulagad.* — Ha ma diskouarn-me ?.. Lâr 'ta !.. Komz 'ta !..

LOUARN, *gant doan, a souz a-dreñv.* — Man ebet !

BROG. — Mat a rez klozan da c'henou, Louarn, pe me 'm ije klozet anean d'it ! *O sevel e grog.*

KONAN, *da Louarn ha da Vrog.* — Ah ! Ah ! Arabad 'n em dabutal ! Da betra ? Daoust hag eur gonid bennak ho po ? Madou ouspen, pe furnez ? *Da Vrog, oc'h ober sin d'ean d'azegan.* Grez eveldon ; eun tamm bara 'nez keno a lako skoilh d'az teod ; ha, gant hon daoulagad, ni 'zello ouz ar mor.

BROG, *oc'h azezan.* — Sellet awalc'h am eus outan ha c'hoaz e ran. Ha mar 'teus tôlet evez eveldon, daoust ha komprenet 'teus ive ? Breman 'zo eun eur, an tempest, goude eun nozvez kounnar, a rede c'hoaz, 'vel eur bagad chas dirollet, war c'horre ar mor ; — ha setu souden, 'vel

senti ouz eur mestr ha ne welomp ket, ar gwagennou 'zo difuloret, kement ha ken bihan ma ne weler ken an disteran takenn dour oc'h eonenni ouz troad an tornôd !..

KONAN. — Gwelet am eus memez tra eveldout ; kompren, avat, n'am eus ket grêt.

MERIADEG. — Daoust ha red eo gouzout pep tra ! Biskorz n'on manet hep kousket gant c'hoant gouzout ar c'helolou. Ar mor a oa dirollet tenoz, ha 'n eun tôl, setu hen kômpez. Penôs eo c'hoarvezet an dra-ze ? N'ouzon ket, na c'houi ive. Bolonte an doueou, hag a zo pennadus, 'vel ouzoc'h. Mar n'eo ket ma c'hôz diouz ho toare, klasket eun all da blijout d'ac'h !

DIVIZ IV

AN HEVELEP RE, BRAN-DU. *Diftukan ra diouz a-douez ar c'berreg, hag en he sav, difinv, e sell ouz ar mor*

LOUARN, *o tôl evez outi.* — Ah ! setu aman Bran-du ! Koz kaouenn ar Roc'h-Velen a ya da lâret d'imp ar wirione war ze !

Bran du a chom difinv ha mut.

KONAN. — Ha mar ne gar ket ar goz frao koagal hirie ?

LOUARN. — Dont awalc'h a rafer a-benn d'ober d'ei digeri he geno !..

Brog a zo en em dennet eun tammik a-goste.

BRAN-DU, *o sellet oute o daou, talarek.* — Ar goz frao a gan pa blij d'ei, ha mar tro 'n he fenn kanan raktal, e lavaro d'ec'h n'eo ket bet beuet holl ezen ar Yeodet gant ar reverzi diwezan !

KONAN. — Ar flipad-se 'zo evidon ?

BRAN-DU *gant disprix.* — Kemeret-han evitan, an neb a garo ! Ar wirione 'zo kazus d'an neb a zo anwazus !

LOUARN, *oc'h ober eur gammed war rôk ha diou a-dreñv.* — Diwall, sorserez milliget, na gouezfe ma dorn war da benn-boeta !..

BRAN-DU, o sellet oute gant dispriñans. — Deut 'ta! N'am eus ket aon ouzoc'h! Ar sorserez, c'houi 'oar, a dôl gwall-chans war ar re a rebarb outi... Pa ve al loar a-du, ar sorserez a oar kaout vi ru an naer vras... (*Souzan 'reont gant spont; derc'hel a ra he sell warné*). Diouz gwelet ar vran o nijal, ar sorserez a oar petra ve en hent o tont. N'eus man kuzet eviti en amzer vremen. Ma karfe Bran-dalâret kement a oar... (*Sellet ra oute talarek, ha paouez eur pennad da goaz, eu eur groazian ha divroc'h*), aman 'zo ouspend unan hage vije berroc'h e deod ha hiroc'h e fri! — C'hanta, pôtrede vat, boc'het oc'h?

Holl o deus souzet a-drevo.

LOUARN, o klask damesaat Bran-du. — Gout a ouzomp, Bran-du, ez out ken galloudus war ar vad evel war an droug, pa garez bean plac'h gentil.

BRAN-DU, o sellet oute bepred gant eur c'hoarz goabaüs. — Ya, bac'hadou a roan d'ar chas drouk a glask kregi ennon, ha tammou kreun d'ar re a deu da lipat ma zreid...

KONAN. — Aman n'eus hini ebet o klask kregi.

BRAN-DU, gant dispriñ. — Doan ho peus! Met ho pugale, mar kredfent, p'am c'havont war o hent, a yudfe mein war ma lerc'h, hag ho merc'hed am dispennfe gant o dent...

MERIADEG. — Fazian rez, Bran-du; holl dud ar plou a oar e teus te galloud da barean kement klenved a zo. N'eo ket te 'ta a ya da gutuilh al linadenn real hag an uvelen-c'houero, ouz skeud ar loar, da hanter-noz?

KONAN. — N'eo ket te a oar tennan, diouz uhelvar an dervenn, louzou ouz an derzien ha louzou ouz ar boan daoulagad?

LOUARN. — N'eo ket te a ro d'ar beajour ar yeotenn aour a dro pep gwall-chans diwarnan?

BRAN-DU. — Eo, me! Kement-se holl am eus desket gant mistri an holl skianchou, an drouized enorus.

MERIADEG, o krusan e ziskoa. — Drouized! N'eus ken diouté!

BRAN-DU. — Eo, Meriadeg, bean 'zo c'hoaz! Me oar

pelec'h int 'n em dennet, du-hont, en forest Brekilien. Gant ar blâ neve, pa ne welet ken ar Vran-du goz wardro he nez, etouez ar gerreg, c'hanta, ét e ve warzu ar c'hoad bras, diwisket gant ar goanv, 'lec'h ne chom ken, war brankou ar gwe dero, nemet bod glas an uhelvar. Eno, endro d'an dolmen ledan, an diwezan drouized a dalc'h bepred gant o lidou sakr.

LOUARN, gant spont da Vran-du. — Gwelet 'teus ané?

BRAN-DU. — Ya, o gwelet am eus, ha mont a rin, c'hoaz eur wech, d'o bete, arôk lezel, gant ma breudeur ar brini, ar garg eus ma relegou.

KONAN. — N'out ket gwell joaüs, Bran-du!

Klevet a veer kanan a-bell, ar mouezjou o tostaat a damm da damm.

Eunn eostig a glevan bep noz,
Er jardin war eur bodig-roz;
Eun eostig bep noz a glevan;
Ken gé e kan, ken dous e kan!
Ken dous e kan, ken kaer, ken flor,
Bep noz, bep noz, pa zioul ar mor.

BRAN-DU. — Sell aze hag a zo sederoc'h; chilaou!

LOUARN, o chilaou. — Mitizien prinsez Lexobi! Emaent o tont, evel bemde, da gerc'hat dour d'ar feunteun evit an Itron Adevisia.

DIVIZ V

AN HEVELEP RE, PEDER MATEZ AR BRINSEZ

Chom a reont a-sav ha paouez da ganan, pa welont Bran-du

BRAN-DU, d'ar mitizien. — Perak e tavet, merc'hed? An evned bihan ne baouezont ket da ganan 'vit kelou d'eur goz frao tyemen ebiou d'o nez. Kanet 'ta, kanet! Ra vo klevet mouez ho levenez e kreiz tristidigez ar bed! Danset ive, danset! Ha n'ouzoc'h-hu ket dansal, evel gwechall Keltized an Arvor?

BROG, hag a zo tostaet. — Bean 'oa « Dans an dour » ha « Koroll ar gwrac'hed ». Gant ma zad, mé 'm eus klevet

e ouie ma mamm kas anê endro koulz hag eur rouanez...

KONAN, *d'ar mitizien*. — Ac'hanta, plac'hed yaouank, grêt eur pôz ganimp aman, ha danset d'imp!

MERIADEG. — Ho podou-dour a zo ganec'h; danset d'imp Koroll an dour.

KONAN ha BROG. — Ya! Ya! eun tamm dans!

UNAN-EUS AR MITIZIEN. — Dansal a refomp eta, war ho koulenn, Koroll an dour.

KOROLL AN DOUR

1

Gant an draouienn, e teuont holl,
Merc'hed yaouank, en eur c'horoll,
Da gerc'hat dour d'ar feunteun sklêr
A strink du-hont 'n harz ar reier;
En eur ganan, en eur c'hoarzin,
E teuont, dre c'hliz ar mintin,
Da gerc'hat, war o slijadur,
An dour, yec'hed pep krouadur.

DISKAN :

Trali trali tralilonla — Tralitrailonle traliêno!

2

Dirak an dour, glân e lagad,
En o c'halon e sav ebad;
C'hoarzin 'reont, ar merc'hed flour,
O sellet o skeud 'barz en dour;
Kanan reont, ar merc'hed koant,
War ar skoa o fod olifant;
Koulmig ar c'hoad, pa o c'hlevo,
D'o respont, ive a gano.

3

Azezan reont, dibreder,
Ar merc'hed yaouank, er sklêrder;
Azezan reont da ziviz,
Tal dervenn mab gwenn an drouiz;
Hag hiboud ar waz o tremen,
War he fouez, e skeud an derven,
A lavar d'ê : Tremen a ran,
Met en eur dremen e kanan.

4

Ar merc'hed yaouank dizoursi
Zell ouz ar c'hoummoul o teuzi,
O teuzi en nenv marellet
Evel mogedenn an balet :
Mogedennig glas ha tano,
En oabl, c'houi a skriv eur hano?..
Met eun hunvre n'eo ken, siouaz,
Teuzet eo ar goummoulenn c'hlas.

5

Ar merc'hed yaouank, gant doujans,
Da brinsez Arvor, 'n he noblans,
A gaso, da skuilh 'n he c'herec'hen,
Dour sklêr ha fresk 'vel eur c'hlizenn;
A gaso d'ei an dour andon.
Ra vad d'ar penn, vad d'ar galon...
Kenavo d'it 'ta, feunteun vad,
Echu koroll, echu ebad!...

KENTAN MATEZ. — Petra 'larfe hon mestrez, an Itron Enima, mar kavfe ac'hanomp aman o kanan hag o tansal?

LOUARN. — Ken grignous-se eo an Itron Enima?

EIL MATEZ *d'he c'honsortezed*. — Deomp prim hag e adapt-fomp an amzer gollet!

BRAN-DU, *d'ar mitizien*. -- Klevet 'ta, koulmed ma c'halon, na dæc'het ket evelse, 'rôk m'hon devo ho trugarekaet!

MERIADEG. — Ha mar g eo re bounner ho podou!...

KONAN ha BROG. — Ni 'roïo dorn d'ac'h d'o dougen.

AR PLAC'HED. — Nann! Nann! Trugare! *Ez eont kuit d'ar red en eur ganan.*

DIVIZ VI

KONAN, MERIADEG, LOUARN, BROG, BRAN-DU

LOUARN, *o sellet ouz ar plac'hed o tec'hel*. — Emaënt o vont da gerc'hat dour. Deomp ni d'an ôd; marteze n'hon deus ket furchet mat...

KONAN, *da Vran-du*. — Te hag a zo divinourez, lâr d'imp 'ta pelec'h eo kuzet tensoriou an dud beuzet ?

BRAN-DU. — Er vro elec'h m'int ét o-unan hag a belec'h ne deu den !...

MERIADEG. — Sklasan 'ra ma gwad o klevet ac'hanout.

BRAN-DU. *o tiskouez eur poënt du war ar mor*. — Bagiou a fell d'ac'h ? Setu aman unan...

LOUARN, *o sellet piñ*. — Eur vag lèr, henvel ouz ar re a deu eus an Enezenn vras. Ne ve warné nemet Bretoned, ken paour ha ni hon unan.

MERIADEG. — Met penôs he deus gallet an tamm plus-kenn u-ze ober hent fenez, e kreiz ar mor dirollet, hep bean lonket gantan ?

KONAN, *da Vran-du*. — Ha te oar, Bran-du ?

BRAN-DU. — Goût ouzou.

BROG, *a vouez izel da Vran-du*. — Neuze e teus gwelet Tual ?

BRAN-DU, *a vouez izel da Brog*. — Gwelet am eus anean, 'n e sav war an tevenn, oc'h ober eur sin, evel eur groaz war ar mor.

BROG. — Hag e teus gwelet ar mor o sioulaat raktal ?

BRAN-DU. — Gant ma daoulagad ma unan ! *D'ar re-all, krenv*. C'houi etrezoc'h, ét betek ar Roc'h-toull, hag e kavfet eur c'houfr stlapet eno gant ar mor.

KONAN, *gant prez*. — Hag e zo petra ennan ?

MERIADEG. — Dilhad kaër ? Armou ?

LOUARN. — Arc'hant ? Aour ?

BRAN-DU, *goapaüs*. — Man ebet, marteze...

KONAN, *o tiskouez d'ei e zorn*. — Sorserez milliget, mar rez goab ac'hanomp !...

BRAN-DU. — C'houi 'rento kêlou d'in... Et buan, betegout n'arrufe re-all en ho rôk !...

DIVIZ VII BROG, BRAN-DU

BRAN-DU, *he zell war ar mor*. — Ah ! ar vag lèr-ze a zigas d'imp c'hoaz eur garg-all ! Malloz warni ! Lâret a reont ec'h ouzon pep tra ! Nann ! N'on ket ken gouiek ha Tual ! Met fellout a ra d'in bean, ha bean a vin !

BROG. — Netra ézetoc'h. N'eus nemet chilaou e gomzou. Ne baouez ket da vont ha da brezek, kouiz dre an argoad evel dre an arvor. Mar teuez da gredi en e Zoue, eskuilho war da benn an dour awalc'h ar pec'hed...

BRAN-DU, *droug enni*. — E kredez lâret ?... Serr da c'henou, Brog, serr da c'henou ! Goude ar Romaned, ar Varbared ! Goude ar Varbared, ar Vretoned ! O Doue hag o yez a zigasont d'imp ! Benn eur pennad, ne vo ken aman nemet Bretoned ! Mervel eo poënt d'in !

BROG. — Lâr 'ta, bevan ! Deut an de, herve klevet, ma tle paran war an Arvorig eur sklerijenn dispar ! Heol ar justis hag ar garante a zo war zével 'us d'hon fennou !...

BRAN-DU. — Piou a lâre ze ? Tual ?

BROG. — Ya, Tual ! Ha burzudou gantan leiz e zorn da harpan e gomzou ! Gant eur ger, e lak buhe er re varo ; hag e keit-se, Eflamm, e ziskibl, a dôl er mor aërouant tréz an Hirglas...

BRAN-DU. — An aërouant ? Oh !

BROG. — Gwir mat ! Ha Tual e sent ar mor outan ive. Gwelet e teus !

BRAN-DU. — N'hellan ket dislâret... O doueou ar Gelted koz, kousket dindan ar mein sakr, daoust ha kollet ho peus ho nerz hag ho kalloud ? Ha red e vo d'in ive paouez da gredi ennoc'h ? *Mont a ra kuit gant eun ér dizesperet*.

DIVIZ VIII

BROG, *e unan*. *Mont a ra betek ar mor hag e sell war-zu an dremwell*

BROG. — Tostaat a ra ar vag. Gwelet e ve dija an dud a zo enni... ar sturier krog er vaol... merc'hed... Met setu

Tual e-unan gant e ziskibl Laouenan ; marvad e teuont da zaludi an estranjourien-mañ, pa digouezfont. *Tic'hel a ra.*

DIVIZ IX
TUAL, LAOUENAN

LAOUENAN, *a bign war ew garreg hag a zell ac'hane ar vag o tostaat* — Tad, eman bag an itron Koupaia o tremen dre-douez an inizi... Sellet... digouezet eo 'barz eur pieg dan-jurus, drek kribennou ar mein rouz ! Ar sturier, ha goût a rei dre belec'h kas e vag ?

TUAL. — Dorn Doue a zo war ar stur, ma mab. Ho pag c'houi, ha n'eo ket deut, evel houman, betek ôchou an Arvorig, hep spont na gloaz ?

LAOUENAN. — Eo, tri goanv a zo tremenet aboue ; ter gwech an neve-amzer en deus dihunet kalon an douar, hag en em c'hreiz, gouli an droug-hirnez n'eo ket pareet c'hoaz. Pa 'z a an heol da guz kreiz ar gwagennou alaouret, me 'glask, e tu-all d'ar mor, e kreiz mougenn-ar pellder, ôchou diwalc'het an Domnone, hon bro ger...

TUAL. — O Laouenan, ma mab, penôs ne gavfemp ket aman hon bro, p'eman Doue dre holl ?

LAOUENAN. — Ar wirione 'zo ganac'h, Tad, met daoust ha ne oa ket nesoc'h Doue d'imp, pa oamp, en hon bro, en hon Breiz hanvet Enezenn ar Zent, aboue m'o deus Jermen Auxerr, Ninian, Koulm, ha kant all, hadet enni ar fe ? Aman, ar bobl pagan a stou c'hoaz dirak ar falz doueou lezet war o lerc'h gant ar Varbared, en o zemplou dismantret...

TUAL. — Setu perak Doue ho tigas d'an Arvorig, evel ma kasas gwechall Patrik d'an Iverzon. Dister eo hon galloud, mar g eo bras hon labour ; bezomp, da vihanan, servijourien sentus etre daouarn an Otrou.

LAOUENAN. — O tad Tual, an Otrou, dre da zorn, a ra buizudou. Er beure-man, zoken, ar mor sioulaet dre da vennoz...

TUAL. — Me 'meus grêt sin ar groaz... Doue en deus

grêt ar burzud. Rentomp meulodi d'ean pa en deus teurvezet rei goudor, en kreiz an arne, da vag Koupaia, ma mamm... Gwel, Laouenan, pegen sioul e teu da gât an ôd, renet gant Ele ar mor ! Anavezout a ran dija an hini he deus ma douget ha ma maget ; anaout a ran ma c'hoar. Seva ! *O sevel e zionvec'h.* Gloar da Zoue, 'vit al levenez a lak em c'halon !

Klevet e ve ar c'han a deu eus ar vag ; gwelet a reer ar vag o treuzi ar mor, hag o tont d'ar garreg, elec'h ma tiskenn ar beajourien.

KAN AN DREIZOURIEN

War don : *Breuleur, ni 'glav ho klemmou*

I

Gant Doue, ni 'zo renet,
Meulet vo e hano !
E vouez d'imp deus lavaret :
Tud kêz, lezet ho pro !
Hag hon deus holl, hepdale,
Kuitaet ti, kerent,
Vit mont da heul El Doue,
A-dreuz d'ar mor divent.

II

Pa oa an deiz o sevel,
Ni hon doa kimiadet
Dioz bro garet hon c'havel
Diganimp diframmet ;
Hirie, an heol o skedi
A ziskoue d'hon lagad
Eur vro-all par d'hon hini,
Meulet ra vo an Tad !

III

Tevenn uhel, gerreg noaz,
Peilhet gant al lano,
Trézenn flour ha koajou bras,
Piou a oar ho hano ?
Pelec'h ez omp digouezet ?
N'ouzomp ket ; Doue 'oar ;
Al lec'h 'n eus d'imp dibabet
Zo, sur, eul lec'h klouar.

IV

Ya, ni 'wel d'hon digemer
Tud, war an ôd bodet,
Evel pa vijemp er gêr
A-neve digouezet,
Menec'h o zaë marellet
Hag ar groaz 'us d'o tenn...
Doue ra vezo meulet !
Ar vro-man 'zo kristen !

KOUPAIA, *a ziskenn arôk ar re-all, oc'h astenn he divrec'h da Dual.*
— Ma mab Tual eo, ha Laouenan, e ziskibl ! Doue da vean meulet !

TUAL ha LAOUENAN. — Doue da vean meulet !

KOUPAIA. — Digas a reomp d'ac'h salud ha gourc'hemennou ar Vro goz.

TUAL. — Ha ni a zigas d'ec'h salud ha gourc'hemen-

nou ar Vro neve, ar Vro dibabet d'imp gant Doue !
Deut da ganac'h, ha da zeski d'ar bobl-man o
c'hanan ganac'h, rak an douar-man a vo eur Vreiz neve,
magerez sent, servijouez Doue !

Ar bobl a zo en em vodet endro da Dual ha d'e Yamm.

AN HOLL. — Da virviken !

EIL TOLENN

Peniti Koupaia e Langoat

KOUPAIA,
EVA, he merc'h,
MALHELEW,
BRAN-DU,

GWENN,
OVEN,
ALENOR,
HERA,
PRITELLA, he merc'h,
GUEHENEREK,
SITA, he merc'h,
BREDAKH, laourez,

TORT-BRAS,
BLEIZ KOZ,
EUR MOGN,
EUR C'HAMM,
UNAN war flañou,
EUR BAOUREZ koz,
EUR WREG ezommek,
hag he bugale.

Peorien.

Klaskerezed.

Eur c'horn digoadek e koajou Langoat. — Peniti Koupaia grêt gant
mein ha moudet ha goloët gant brankou. — Kefiou gwe
ha mein bras o servijout da skebel tro-war-dro.

DIVIZ I

SEVA, HERA, ALENOR, OVEN, PRITELLA

Hera hag Alenor a zo o wriat. — Oven, en he zav a zo o tibuni gloan,
Pritella krog er gudenn ; Seva a zo 'n he c'hoaze en o zouez.

HERA, *o tiskouez he labour da Seva.* — Mat eo evelse, itron
Seva ? Grêt 'm eus gwelloc'h hirie 'vit dec'h ?

SEVA, *o sellet ouz al labour.* — Dont a rez da vezan akuit,

Hera ; ne vo ket pell e teskin d'it broudan, evel ma oar ober gwraze ma bro.

OVEN. — Ha skanvoc'h eo o bizied evit hon re ?

SEVA. — Gwechall, en amzer evurus hon Breiz, e weent al lin d'ober lienaj ôter, hag e stagent, ouz dilhad ar veleien ha re ar rouane, brouderez eus ar c'haeran. — Breman, siouaz, pebez chenchamant ! Ar Sôzon, a dôliou skourje, a ra d'ê ober, en ti hag ermêz, al labouriou kalet a rê gwechall o friejou hag o bugale.

ALENOR. — Hon bro ive 'zo bet gwasket gant ar Varbared !

GWENN. — Herve hon Tadou, en amzer ar Romaned, kêriou dispar a voe savet dre ar vro ; en Lexobi, e luc'he ouz an heol toënnou alaouret an templou ; en traoniennou dru, e welec'h mèreriou pinvik, o zoënnou o tivo-gedi etouez ar glazur.

OVEN. — Ha henchou ledan ha paveet a dreuze ar vro, eus an eil mor d'egile, pleustret gant kirri ha soudarded Rom...

SEVA. — Met Doue en deus roet urz d'ar Varbared da ziskarr templou ar falz-doueou, ha da gastizan ar re a zaouline dirakê... Paour kêz bro, a lâran pa zellan ouz ho pro, ha pa zellan ouz ma hini !...

ALENOR. — Ho pro c'houi, itron Seva, ha pec'het he devoa ive ?

SEVA. — Siouaz ! Gweltas ne fazi ket, pa lavar : « Kastiz a-beurs Doue, abalamour da bec'hejou ar Vretoned ! Ar Sôzon a c'houez an tan eus an eil mor d'egile... Ar bobl a zo flastret d'an douar gant an tân hag an dir ».

DIVIZ II

AN HEVELEP RE, MALHELEW, *o tont ermêz eus ar peniti*

MALHELEW. — Seva ! o Seva ! Perak e tibunez seurt envoriou em c'halon ?

PRITELLA. — Da vro, Malhelew, ha kaeroc'h eo evit hon hini ?

MALHELEW. — 'Vit pep den, ma bugel, e vro eo bepred an hini gaeran. Met piou a c'hallfe desrevel pegen koant eo hon enezenn, pegen sklêr an oablou 'us d'ei, pegen glan he dour, pegen fresk he zraoniennou, pegen dru he fienennou !

PRITELLA, *o tostaat ouz Malhelew*. — Perak 'ta, Malhelew, 'teus kuitaet da vro ?

MALHELEW. — Perak ?... Perak ?... Goulenn ze, ma merc'h, digant an itron Seva. Hounnez a zisklêrio ze d'it gwell evidon... Me, aboue an de... gwadan 'ra ma c'halon o sonjal !... Ma bro n'eo ken evidon nemet eur vro estren !...

N'em denn a ra a-goste, sammet he c'halon.

ALENOR, *a vouez izel, da Seva*. — Petra 'zo arru gant Malhelew ?

OVEN. — Perak 'ta e ouel ?

SEVA. — Breman souden, e tesrevelen d'ac'h komzou Gweltas. Hon fobl a oa drastet, skubet gant ar Sôzon. Maedoc, he fried, ha Kevin, he mab, a gouezas dindan o zôliou. Breman, c'houi 'wel perak e red an daërou war dioujod Malhelew.

DIVIZ III

AN HEVELEP RE, KOUPAIA

KOUPAIA, *a deu dre an tu debou hag a chom eur pennad da bed i*. — Otrou Doue, rô d'in da c'hras d'am nerzan, ma c'hallin hirie ober ar vad out e gortoz diganin, vit ma silvidigez ma-unan ha hini ar re-all. Ra vo da hano gwelloc'h anavezet ha muioc'h karet dre ar pez a c'hallou ober ha lavaret evidout da servijerez dister. Gra eur zell a drue ouz ar bobl-man a chom pell diouz da lezenn, e servij ar fals-doueou ! Dre c'halloud da Vab muiankaret, ar Salver Jezus, tenn anei eus he zenvalijenn ha lak da sklêrijenn da baran warni !

HERA. — Setu aman Koupaïa.

AN HOLL VERC'HED. — Ho saludi a reomp, itron enorus !

KOUPAÏA. — Doue da skuilho e vennoz warnoc'h, ma bugale muian-karet. Setu c'houi adarre gant ho labour, aketus da zeski eun tammik bemde.

ALENOR. — O ! gant eur vestrez seurt m'eo an itron Seva !

KOUPAÏA, *oc'h ober stadig da Britella.* — Te 'zo aze ive, Pritella ? Ne gavez ket hir an amzer o renkout chom keit-all 'n ez koaze da labourat, elec'h bezan o redek ar c'hoajou ?

PRITELLA. — O nann, itron Koupaïa, goût ouzon e teuez bemde da gontan d'imp istoriou kaër... O itron Seva, na vet ket anwazet ! Me ho kar ive !

KOUPAÏA. — Ya, merc'hig, ha neuze, red eo karet an holl...

PRITELLA. — Betek ar re a ra poan d'imp ? Ze 'zo dièsoc'h, avat !

KOUPAÏA. — Red mat eo, Pritella, mar fell d'imp bezan kristen. Ha kristenez a fell d'it bean, n' eo ket 'ta ?

PRITELLA. — Ya laouen ! Ha kentan m'hallin. Abalamour da ze, am eus grêt eun êsa... 'Vit ar beure, ma breur Kado en deus roet eur skouarniad d'in ha me... am eus roet d'ean eun aval, goude am boa c'hoant awalc'h d'hen dibri...

KOUPAÏA, *o pokat d'ei.* — Doue ! pegen kaër 'teus grêt kalon ar bugel leun a c'hlanded hag a garante ! N'eo ket souezus o galves davedout, war henchou ar Galile hag ar Jude, hag e roes d'ê da vennoz ! Skuilh ive da vennoz war holl vugale an Arvorig, en eur vinnigan ar plac'h vihan-man hag a vo d'it hepdale, o Jezus, dre c'hras ar Vadeiant !...

GWENN. — Kelou hon deus bet, dre eur mesaër o tiskenn eus ar Pou-Castel gant e zenved, e teuio hepdale Tual, da vab, d'e abati Saon-Treger.

KOUPAÏA. — Gwir eo, Gwenn, *azean ra en o zouez.* D'in

ive 'zo bet kaset kelou. Dont a ra evit rei ar gonfirmasion d'ar re a zo bet badeet ha da vadei ar re 'zo 'n em roet d'ar C'hrist, ha n'eo ket bet c'hoaz skuilhet war o zal an dour santel.

ALENOR. — O itron Koupaïa, daoust ha ni 'vo eus ar re-ze ?

KOUPAÏA. — Me 'gred, Alenor, rak, evit senti ouz ar beleg santel Tual, ma mab herve ar gwad ha ma zad herve Doue, em eus en em laket d'ho kentelien war ar c'hatekiz, forz pegen divalo eo ma c'homz, ha bet oc'h eveziek d'am chilaou...

HERA. — Ya, ha dija, en hon c'halon, hon deus nac'het ar fals-doueou, evit kredi er gwir Doue, an hini n'eus nemetan, hag e teus desket d'imp e hano.

DIVIZ IV

ANHEVELEPRE, GUEHENEREK, — *Eur fagodenn keuneud sec'h war he choug ; diou blac'h vihan war he lerc'h ; an hini vrasan, Sita, a zoug eur vriad blenchou ; an hini yaouankan 'zo krog e broz he mamm. Guehenerek a bôz he fagodenn hag a aze warni, he zell war Goupaïa. Ar vugale en he c'hichen.*

OVEN, *o terc'bel gant he c'hentel.* — Kredi a reomp en deus krouet an nenv hag an douar, hag ec'h eo holl-c'halloudek.

GWENN. — Hag holl-vadelezes, ha setu perak e kar ac'hanomp.

KOUPAÏA. — Ha c'houi 'gar anean ive ?

PRITELLA, *e tont e hichen Koupaïa.* — Me 'gred ennan ive, itron Koupaïa, ha karout a ran a greiz ma c'halon eun Doue ken madelezes all.

KOUPAÏA, *oc'h ober stadig da Britella.* — Mat a rez, Pritella. N'eo ket hepken dre ar fe e tleomp en em stagan ouz Doue, met dre ar garante, dreist-holl.

ALENOR. — Mar karez, Itron, ni 'gano ar c'hantik kaer eman ennan an holl gwirioneiou hon deus da zeski ?

ΚΟΥΠΑΙΑ. — Ya, kanet, ma bugale ; ar c'han a ro iskili d'ar bedenn da zewel betek Doue, evel ma weler an alc'houeder o sevel skanvoc'h d'an nec'h diwar bouez e zonig. Ar roue David a c'hoarie gant an delenn pa veze o kanan e psalmou. Kanet, ya, kanet, a-bouez-penn, a greiz kalon ! *Kanan reont.* (Cf. Kantikou : n° 94. Ar c'hatekiz war gan).

I

Doue zo a-viskoaz, unanet e tri ferson,
Krouet en deus pep tra, pep tra a zo d'ezan
E zaoulagad a wel bete diabarz hon c'halon,
D'ezan, kont a rentfomp eus an traou disteran.

II

Roet en deus d'an dud e c'houc'hemenou santel,
Ha war al lezenn-ze, pep hini 'vo barnet :
D'ar Baradoz ec'h ey kement den a vo fidel,
En ifern e kouezo ar pec'her milliget.

III

Doue, dre vadelez kenver ar bec'herien gêz,
En deus bet digaset e Vab war an douar ;
En eur c'hraou vo ganet gant eur Vamm bepred gwerc'hez ;
Goude kalz a boaniou, e varvas er C'halvar.

IV

Kredi, goulenn, ober, resev eo ar pevar zra
A disker d'ar bugel ; divallomp d'o ankouaat ;
Ne chom gant ar c'hristen nemet an traou vat a ra,
An traou all a dremen evel eur zerr-lagad.

SITA, *hag a zo tec'het diouz kichen he mamm, a zistro, spontet.* — Mamm ! Mamm ! Gwelet 'm eus anei aze ! aze ! drek eur vodenn vras !

OVEN, *o sellet hag o souzan ive spontet.* — Gwir eo ar pezh a lâr Sita ! Bredakh eo ! Laourez Koatspern !

GWENN, *o sellet ive gant doan.* — Daoust ha kredi 'rei dont betek d'imp !

ΚΟΥΠΑΙΑ, *o sevel.* — Nann, ma bugale, bezet dinec'h, ne stoko ket eur biz ouzoc'h ! *Mont a ra war-zu elc'h 'man ar laourez. Houman a glask tec'hel. Gwelet e ve a-dreuz d'ar brankou.*

DIVIZ V

AN HEVELEP RE, BREDAKH, *kuzet er c'hoad*

ΚΟΥΠΑΙΑ, *gant madelez.* — Perak tec'hel, ma merc'h ? Chom ha lâr d'in petra glaskez aman ? Naon a teus ? Eun tamm bara 'teus ezomm ?

BREDAKH. — Nann ! Akuitan 'ran gant frouez ar c'hoajou da derri ma naon, ha gant dour ar feunteun da derri ma sec'hed. Sell ! Eur c'horf ken dismeg ha hennez, ha dleout a ra magan kement-se a ezommou ?

ΚΟΥΠΑΙΑ. — Riou 'teus, marteze ?

BREDAKH. — Muioc'h 'm o c'hoaz, en de ma tevio an ankou d'am c'herc'hat ! Nann ! *Gant nerz* Ar pezh a glaskan aman eo ar c'homzou a goue eus da c'henou.

ΚΟΥΠΑΙΑ, *madelezus.* — Bredakh, hennez eo da hano, n'eo ket 'ta ?

BREDAKH. Ya, gwechall, pa dougen eun hano. Breman, n'on ken nemet ar laourez, ar pezh vil, ar spontailh, an hini a ra aon, an hini a dec'her en he rôk.

ΚΟΥΠΑΙΑ, *o kregi en he dorn.* — Nann, me ne dec'han ket dirazout. *Pokat a ra d'ei.*

BREDAKH, *o 'n em diframman.* — Ah ! na stokez ket ouzin !... Ar maro 'zo evit an neb a stok ouzin !

ΚΟΥΠΑΙΑ. — Ha me eo ar vuhe a fell d'in rei d'it, ar vuhe hep diehez na maro... Ar vuhe evurus hag a bado da viken !

GWENN, *o vont da Goupaia, hag o pedi anei.* — O itron Koupaia !

SEVA. — Petra 'rez aze ? Lez ma mamm d'en em gemer herve mar lâr Doue d'ei ! Doue he miro a bep droug, mar plij gantan.

BREDAKH. — Ya, bemde e teuan, e kuz, betek da beniti, pa vez o komz d'ar merc'hed a vez o teski ganit ar relijion neve. Diarc'hen e valea... ha na delienn, na bod

ne drouz dindan ma zroad, nemet hirie am eus stoket ouz eur brank.

SITA. — Hag am eus klevet ac'hanout... Ha pa 'm eus sellet, am eus bet aon, hag am eus huchet : Bredakh, ar laourez !...

BREDAKH. — Breman zo... ah ! n'ouzon ken pegeit 'so, ken hir bag em eus kavet ar blaveziou... me 'oa eur gaër a blac'h ive, eur goantenn evel d'out, Sita, ha pa dize d'in gwelet ar laourez, e youc'hen gant spouron ! Ha me, breman, unan ané ! Piou 'oar petra 'zo ouz da c'hortoz ive !

KOUPAÏA. — Kentoc'h e lârin : Piou 'oar petra 'man Doue e sell d'ober ganit ?

BREDAKH. — Ma farean 'ta, da Zoue, pa lârez eo ken mat !

KOUPAÏA. — Kredi 'rez en e c'halloud ?

BREDAKH. — Kredi 'ran !

KOUPAÏA. — Kredi 'rez en e vadelez ?

BREDAKH. — C'hoant kredi am eus !

KOUPAÏA. — Bez fianc en e drugare ! N'ouzon ket ha parean rei da gorf ; met, dre zour ar vadeiant, da ine a vo gwalc'het evit ar baradoz...

BREDAKH. — Petra eo ze, ar baradoz ?

KOUPAÏA. — Eur rouantelez ken kaër, ma n'haller ket lâret pegement, bag out galvet da ren enni gant Doue.

BREDAKH. — Me ?...

OVENN hag ALENOR, gant eñz. — Hounnez ?...

KOUPAÏA. — Ya, te ! Eno ne vi ken ar pezh vil ma 'z out, met eur grouadurez eus ar c'haëran, rak ar c'horfou ive a sklêrio eno, eun de, gant sklêrijenn Doue.

BREDAKH. — O Koupaïa, ha gwir mat eo ar pezh a lârez ?...

KOUPAÏA. — Gwir mat ! Met kent ma c'helli gwelet an

damskeud eus an treo-ze, ken neve evidout, e renkez deski gwirioneiyou hon relijion.

BREDAKH. — Bemde, me dastume, e koach, kement munut mad a c'hallen da dapout eus da gomzou...

KOUPAÏA. — C'hanta, adalek hirie, az tevo da walc'h eus bara ar wirione. Bemde, pa 'z eio an heol da guz drek an dorgenn, me 'yeï d'az kaout, Bredakh ! Peuc'h Doue ro vezo ganit, Bredakh ! Kenavo warc'hoaz !

BREDAKH. — O ! Trugare !...

KOUPAÏA. — Jezus, mab David, te hag a teus pareet an dek laour, mar karez, te 'bareo houman ive ! Met da c'halloud a zo d'it ! Ne teus prometet d'imp nemet ar burzudou a lak pare an ineou... Madou 'r bed-man, ne teus ket o frometet d'imp. Skuilh da c'hrasou gant l'argente, o Doue meurbet galloudus ! o Doue meurbet madelezes !

Mont a ra en be feniti.

PRITELLA, o sellet 'wezek lec'h eo tec'het Bredakh. — Breman, pan eo et endro, deomp ive !

GUHENEREK. — Deut 'ta, ar bec'h a zo pounner hag an hent a zo hir...

Mont a ra endro gant he daou vugel.

DIVIZ VI

SEVA, HERA, OVENN, GWENN, PRITELLA,
MALHELEW

MALHELEW, o tougen eur bodez hag a lak war eun dôl teo ha fêtis. — An itron Koupaïa he deus gourc'hemennet lakaat war an dôl pred ar beorien ; d'an eur-man e teuont bemde da brejan.

Klevet a veer trouz treid ha hôz.

SEVA. — Peorien gêz ! . . . Sellet a ra. Setu int o tont dre wenojennou al lanneg. Ar merc'bed a zell ive.

ALENOR. — Teukan 'reont 'barz ar vein !

GWENN. — An Tort-bras eo ar pôtr arôk !

OVEN. — Sell pesort bandenn feneanted ! Tud ha n'int mat da vann ! Mar labourfent... eveldomp !

HERA. — Ro d'è da nadoz ha da gegel, Oven !

OVEN. — Goapaerez fall !

HERA. — Menec'h Tual a zeskfe d'è awalc'h labourat douar, pe ober wardro ar gwenan...

SEVA. — Arabad anwazi anè gant ho rebechou, merc'hed. An evned ne' hadont ket ; al lilienn ne oar nean nag ar gloan, nag ar zeñ. An otrou Doue a gemer-evez ouz an evned hag ar bleuniou. Ni, kemeromp evez ouz ar re-man, *o tiskouez ar beorien*, abalamour da Zoue.

DIVIZ VII

AN HEVELEP RE, KOUPAÏA

KOUPAÏA, *o tont eus he feniti*. — Malhelew, bean 'zo peadra war an dôl, lêz leiz ar bodezed ha bara segal leiz ar panerou ?

MALHELEW, *o tiskouez an dôl*. — Prest eo pep tra. Deut an dud pa garfont !

KOUPAÏA. — Digas c'hoaz ar pezh kig-sal hon deus bet digant mevel Kastel-du.

MALHELEW. — Ne vo ket bras ar pezh a chomo ganimp !

KOUPAÏA. — Bras awalc'h !... Mat eo dioueret ar c'hig. Lak c'hoaz... Lak ive ar frouez hon deus bet eus Saon-Treger, digaset d'imp, 'vit ar beure, gant Laouenan, a-berz Tual.

MALHELEW, *gant keun*. — Ar frouez ive, Koupaïa ?... Petra 'ta 'vano ganimp ?...

KOUPAÏA. — Gras Doue, Malhelew ! Hag ankouaet e teus komz hon Salver ? « Na vet ket trubuilhet gant an dibri hag an evan : al lapoused ne hadont na ne vedont, hag ho Tad a zo en nenv a deu d'ô magan. Ha n' hoc'h-hu ket dreist d'al lapoused ? »

MALHELEW, *o taoulinan*. — Mamm, pardonet ac'hanon,

mar 'm eus ankouaet ar pezh a c'hourc'hemenn d'imp hon reolenn : bezan distag diouz pep tra.

KOUPAÏA, *oc'h astenn an dorn d'ei*. — Sav 'n ez sav, Malhelew, ha kerz, a galon vat, da zigemer ar re a deu d'imp a-berz Doue. *Ar merc'hed a ya kuit*.

HERA. — Bennoz Doue warnoc'h, Koupaïa !

ALENOR. — Ha warnoc'h, Seva ! — Warnoc'h, Malhelew !

GWENN. — Dizrei a reomp d'ar gêr, rak hon zud a zo e gortoz ac'hanomp.

KOUPAÏA. — Ya, èt, ha kaset d'è ar peuc'h hag al levez, da c'hortoz rei d'è arsklêrijenn, pa 'po he digemeret.

OVEN. — Koulskoude, mar gallan rei d'it eur sikour bennak da zerviji ar re-man ? *O tiskouez ar beorien*.

KOUPAÏA. — Trugare, Oven, an enor-ze 'zo evidomp. Kenavo, ha dizroet, en ho kalon, war ar c'homzoù ho peus klevet aman.

Ar gwraze a ya ermêz.

DIVIZ VIII

KOUPAÏA, SEVA, AR BEORIEN

TORT-BRAS, *o tont*. — Salud d'ec'h, itron Koupaïa, evidon hag evit ar re a deu aze war ma lerc'h !

BLEIZ-KOZ. — Ra deuo Jupiter, ha kement doue a zo, da...

TORT-BRAS, *o jachan war e chupenn*. — Serr da c'henou, kloukez ! *A vouez izel* : Gout awalc'h a rez, an itron ne blij ket d'ei klevet hano eus ar « suit »-se !

AR MOIGN. — Bleiz koz eo bepred digor e c'heno ; pa n'eo ket da lonkan, eo da zizac'han eur poz treuz bennak !

AR C'HAMM. — Ober a rei lakaat ac'hanomp ermêz, hag ec'h efomp ac'han hep tamm ebet !

KOUPAÏA, *hag a zo o c'hortoz ané, a deu da benn bent d'el.* — Oc'h aze tout, ma teorien gêz ? Tort-bras, Bleiz koz..., *hauvan ra ané holl.* Brug n'eman ket ganac'h ?

TORT-BRAS. — Chomet eo warlerc'h... Stiejan he bandenn he deus d'ober...

AR MOIGN, *a goste d'ar c'hamm.* — Ya, pa he deus kresket anei ! Devoa ket trawalc'h eus he hini, hag he deus kemeret hini Oureka, 'vit lakaat an itron da gaout muioc'h a drue outi.

AN HINI GOZ KÉZ. — C'houec'h 'zo hirie e-pign ouz he broz. Ha me lâr d'ac'h 'zo brud ganté ! Vel gant eur c'hôradenn eyned bihan endro d'ar yar goz, pa ve al louarn war o zro.

KOUPAÏA, *d'ar beorien.* — Kemeret pep bini e blas, evel en deiou-all : Tort-bras, aman war ar men ; an hini goz kéz, du-hont, war ar skod...

Ar beorien a ya pep hini d'e blas.

BLEIZ KOZ, *o ruslan c'houez ar boed.* — Me 'zant c'houez sou-benn ar c'hig-sal !

TORT-BRAS, *o c'housaat ive.* — Ha me, c'houez ar bara tomm.

AR MOIGN. — Jachomp warni, pôtréd !

AR C'HAMM. — Rak ne vo ket friko bemde !

TORT-BRAS *a aze war eur men, en tu-debou, Bleiz-Koz en e gichen ; ober a ra sin d'ar c'hamm.* — Deus 'ta aman, 'n em c'hichen, koz kanfard, hag e roi d'in ar pezh az tevo a re.

Ar Moign a aze demdost d'el, war eun dreujadenn ; an hini goz kéz a fell d'ei mont 'n o c'hichen ; Pôtr e flaiou a zo 'n e sav e tu klei.

AN HINI GOZ KEZ, *d'ar Moign.* — 'N em dres eun tamm, te, koz tagnous !

AR MOIGN. — Kement-se a blas 'teus ezomm 'vit lojan da stripou ?

E heit-se, Koupaïa a garg ar skudellou pri, ha Seva a ra ar servij, o komans dre an hini goz kéz.

AN HINI GOZ KEZ, *da Seva.* — Trugare, itron gêz ! D'ar

Moign. Mar lârfen d'ei ne vez ket mons dalc'hmad, ha gant-se, pa n' ez da laerez pesked, en noz, da stang ar gouent !...

AR MOIGN, *droug ennan.* — Lâr d'ei 'ta, koz kaouenn, ha te welo ive hag-en ne dorrin ket d'it da eskern !

AR C'HAMM, *bet e damm gantan.* — Ichekon, tudou kéz ! Pesort todion 'zo ganec'h ! Er stumm-ze e ve en em dalc'het e ti eur Rouanez ? N'ho peus ket a vez ?!

BLEIZ KOZ, *Seva a ro e zoubenn d'ean, hag e c'housa e skudell.* — Ah ! aetra nemet ar c'houez a ra vad ! Vel pa vije n'ho kof ! Ze domm e vannac'h gwad d'ar paour kéz !

TORT-BRAS, *deliou kôl e beg e loa.* — Sell 'ta, koz Bleiz ! Kol glas !... Ar seurt-se, ma fôtr !...

AR C'HAMM. — Ya, eur Rouanez a renke houman bean, sur awalc'h... Hag eur rouanez vras c'hoaz !... Seurt gant he c'hegin n'eus ket bepred ! Lipat 'ran ma bizied diwarni. Ober 'ra ar jestr.

AR MOIGN, *o torchan e veg gant e vanch.* — Ha lâret ne viron tamm ebet evite ! Herve, ne zebront aman nemet bara sec'h, ha n' evont nemet dour !

KOUPAÏA, *a deu da gât pôtr e flaiou a zebr didrous 'n e goaze en eur c'horn.* — Penôs 'man kont gant da ziouhar, paour kéz namet ? Pell eo d'it dont betek aman !

POTR E FLAÏOU, *o tiskouez e ziouhar.* — Red eo d'in ober gante evel m'emaent ! N'hallan ket lâret, avat, e rentont d'in ar memes servij 'vel pa o devoa ugent vlâ !

Koupaïa a ya da gerc'hat bara ha hig evit pôtr e flaiou. E heit-se, an hini goz kéz, hag a oa o ehilaou, a lâr d'ar Moign, 'n eur diskoue be diouhar-hi.

AN HINI GOZ KEZ. — Ne gomz ket eus ma re, han ? *En eur flouran he gar.* Ma diouhar paour ! Ha koulskoude, pa grog ar boan ennê, e sonj ganin e ve eur vandenn chas o krignat d'in ma zammou eskern...

AR MOIGN. — Pôtr e flaiou a oar 'n em lipat, han ? Sukr ha mel tout a ve, pa gomz ouz an itron !

DIVIZ IX

AN HEVELEP RE, BRUG, hag AR C'HOUEC'H BUGEL

Unan war he choug ; eun all a-stlej heli an dorn ; eur plac'hig a zoug eun all bihanoc'h eviti ; ar re-all a deu warlerc'h ; unan, eur bod deliou en e zorn ; eun all, gant eun tamm koad stag ouz eur gordenn.

BRUG. — Pardonet d'in, Itron Koupaia ! Diwezat on ! Kement a boan am e o stlejan war ma lerc'h tout ma bandenn !

AN HINI GOZ KEZ. — Ha hini ar re-all !...

KOUPAIA, *da Vrug*. — Ya, paour kêz Brug ; met bez dinec'h ; laket eo da lod d'it a-goste. *Diskouez a ra d'ei eur men bras eno, e kichen*. Setu plas d'it, aze, ha d'az pugale.

BRUG, *a aze, eur bugel war he barlenn, ar re all endro d'ei*. *Diskouez a ra ar vugale*. — N'o deus debret tamm aboue dec'h ar beure, ar paour kêz innosanted ! Ar bara n'eo ket frank du-man.

KOUPAIA. — Pa vanko d'it, deus aman !

SEVA, *a servij ane*. *Ar vugale a depr evel bleidi bihan*. — Paour kêz bugaligou ! Nag o deus naon ! *Ober a ra allazik d'ei*.

MALHELEW, *o tostaat ouz Koupaia hag o tiskouez ar beorien*. — Itron, ar re-ze 'zo kanfarded, darn ane, hag a ra goab ouzoc'h...

KOUPAIA. — Forz a zo, Malhelew ! Ni ne dleomp ket ober goab diouté ! Da Zoue e-unan e reomp aluzen, na pa ne ve ket net daouarn ar re a zigemer ane. *Hag e tale'bont o zer da zerviji ar beorien*.

DIVIZ X

AN HEVELEP RE, BRAN-DU

Dont a ra dre an tu klei hag e chom eun tamm a-goste, abalamour gwelet he-unan, hep bean gwelet.

TORT-BRAS, *o kloukan kig ha bara, hag o tiskouez Koupaia hag he merc'had*. — Red e oa d'ar re-ze dont aman d'ober d'an den tanva c'hoaz eun tamm kig-sal.

BLEIZ KOZ. — En amzer ar Romaned, e oa brao bevan. Hon zud a yee da dor ar C'hastel-du, hag ar zoudarded a silape d'eo restajou bara ha kig !

AR C'HAMM. — Hag o restajou gwin !..

AR MOIGN. — Met aboue m'int ét endro, n'hon deus ket da zibab ; dibri bara sec'h pe ober kof-moan.

AN HINI GOZ KÊZ, *d'ar Moign*. — Oh ! n'eo ket te 'teus grêt ar muian ! Gant eur penn seurt 'so ouzit, n'ez ket da glask rei da gredi d'imp e vez bemde war yun !

KOUPAIA, *da bôtr e flaiou*. — Na deuez ket warc'hoaz, mar d'eo re skwizus an hent evidoul. Seva a gaso d'it da lod...

POTR E FLAIOU. — Ho trugare, itron vat. Met goût a ret ne deuan ket aman, netra nemet evit ar bara a roet d'in, met ive 'vit ar c'homzou a glevan ganec'h. En noz, pa ne gouskan ket, me 'wel, 'vel en eun hunvre, ar baradoz kaer a ro ho Toue d'ar re a gred ennan, hag e sonj ganin, neuze, bean dizamm diouz ma foaniou, ha kaout perz dija en eürusted a gomzet d'in.

KOUPAIA. — 'Benn ma tizroio Tual, e kavo ac'hanout prest da zigemer dour santel ar Vadeiant. Neuze, te 'zanto 'n ez izili 'vel eur vuhe neve, eun tanva eus ar vuhe-all a baro warlerc'h ar maro !

BRAN-DU, *hag a zo tostaat, a lâr dre he dent*. — Petra eta eo an dour burzudus-se ? Ha pesort buhe eo hounnez ? *A vouez ubel da Goupaia*. Da betra, 'vit eun distôladenn mac'h out, e teuez te aman, gwreg, da ampoezoni spered an dud-se gant da c'hévier, war digare an tamm bara a roez d'è ?

KOUPAIA. — Piou out te, pa gomzez evelse ouzin ? N'anavean ket ac'hanout !

BRAN-DU, *o tont stok da Goupaia, hag o sellet outi en he daoulagad*. — Me 'oar piou out, te ! Da welet am eus o tiskenn er Yeodet, eus da vag lèr, hag aboue, meur a wech, on deut aman da welet petra rês, ha da glevet pesort kôjou a ve ganit !

KOUPAIA, *gant dousder*. — Perak out deut aman ? Petra 'm eus me grêt d'it ?

BRAN-DU, *garo*. — Netra ! Met me eo Bran-du, Sorserez an ôchou, hag e fell d'in difenn ma doueou a-eneb d'az hini !

TORT-BRAS, *spontet*. — Ha klevet ho peus ? Eur sorserez eo houman !...

BLEIZ KOZ. — Ec'h a da skei gwall-chans warnomp !

AN HINI GOZ KEZ. — Mar karfe, da vihanan, rei d'in eur bannac'h dour diwar yeot-hud, evit louzaoui ma diouhar !

Ar vugale en em stard ouz o mamm. Pep hini a heuilh berve e roll.

BRAN-DU. — Tôl plê, Koupaïa, merc'h rouane an Bnez-Veur ! Bran-du, ar sorserez, a zo ive merc'h da rouane, d'ar re-ze o doa beli war ar Gelted hag a c'houarne anê, pell amzer ar ôk mao devoa prenet da re eun hano etouez an dud ! Tôl plê, Koupaïa, rak me eo an hini he deus miret en he c'halon doujans d'an doueou enoret gant an drouized ouz troad ar veinhir-ze eo deut Tual, da vab, da blantan warnê ar Groaz. Tôl plê, rak ar groaz-ze, me he bruzuno, ya, gant an diouvrec'h-se, dister da welet, koulskoude, hag a gavo nerz awalc'h evit al labour santel o deus d'ober...

KOUPAÏA, *vel dibradet diouz an douar, a zjougan an amzer da zont*. — Ar Groaz !... M'he gwel pignet, en Arvorig, war bep mene, war bep run ! M'he gwel savet e pep kroaz-hent ! Gwelet a ran, kaeroc'h 'vit templou Lexobi, ilizou hag e ve adoret ennê ar gwir Doue, elec'h ar falz-doueou diskaret ha bruzunet ! Gourenezenn Arvorig a zoug an hano Breiz... Bro ar zent a vo ive !...

BRAN-DU. — Piou a ro an treo-ze d'ei da welet ? Rak lâret a rafed e wel anê !

KOUPAÏA. — Da welet a ran, te ive, Bran-du ! Trec'het out, trec'het gant an drugare !

BRAN-DU. — Biken !

KOUPAÏA. — Gortoz ma tenuio an de merket gant Doue !

E fin an diviz-man, ar c'hoarierien a zo bodet endro da Goupaïa ha da Vran-du : Seva, Malhelew, an den notet, e tu klei ; — ar re-all, e tu dehou hag a-drenv. Holl e chilaouont gant evez diougan Koupaïa.

TOLENN III

Drouized koad Brekilien

ROLLOU :

TUAL,
LAOUEANAN,
KONOTEK,
WOEDMON,
GWEZUK,
KONLAEDD. } Drouized.
GOUVIG, mad Levanora, bugelig.
KOUPAÏA,
SEVA,
BRAN-DU.
LAVENORA, maouez armorikan.

Eul lec'h kele'hiek ha digoat, en forest Brekilien ; er c'hreiz, eun dolmen, skaonion mein endro d'eau.

DIVIZ I

KONOTEK, WOEDMON, GWEZUK, KONLAEDD,
Kuzuilh gantê, endro d'an dolmen

KONOTEK. — Deut eo an eur da lakaat d'ar maro an hini a dle rei e vuhe war ôter an doueou. Prest eo pep tra ; perak chom c'hoaz da zigarean, da zilerc'han ?

WOEDMON. — Red eo tôl evez. Arabad fazian !

KONOTEK. — Fazian ? Petra ? Ha ne bar ket sklêr

awalc'h ar wirione d'hon daoulagad ? Ne teus ket klevet an tarziou kurun spontus o deus freuzet sioulded an noz ? Ha ne teus ket klevet mouez daskrenus an dud spouronnet, o kontan dirazomp an darvoud 'zo c'hoarvezet, tra ken frommus, ma renk ar re gosan anzav n'o deus gwelet biskoaz kemend all ?

WOEDMON. — Ya, klevet am eus ar c'hurunou o strakal ; klevet am eus an testou o tisklêrian an darvoud digouezet.

GWEZUK. — Me ma unan 'm eus gwelet dôlmen ar Gwrac'hed, bruzunet e mil damm evel eun netra, ha, war vevenn ar c'hoad, korfou maro ar mestr-mesaër hag e vevelien, mesk-mesk gant re o loened.

WOEDMON. — Gwir eo, Gwezuk. Eus lein ar roc'h a zav du-hont he fenn 'us d'an dremwell, me 'm eus gwelet ive eun aerouant flamm o leski dervennou bras koad an Heïezed... Ha tan ru a luc'h du-hont c'hoaz... Gwelet ha klevet am eus...

KONLAEDD. — Hag eman c'hoaz da sonj d'ober ganit ?

WOEDMON. — Grêt eo ma sonj diwarbenn an traou am eus gwelet... met abeg an traou-se a glaskan !

KONOTEK. — Petra ? Ne gredez ket c'hoaz eo an doueed, en o c'hounnar, o deus c'houeet an tân-ze evit divastari an douar sôtret gant prezegennou fallakr Tual, Briak, Goneri, Eflam, hag o diskibien ?

WOEDMON. — Mar fell d'an doueou kastizan ar re a ra fae warné, perak eta n'eo ket ar re-ze a skoont, elec'h skei o zud o-unan, mesaerien Brekilien, hag a ve, gant ar blâ neve, o lidan ganimp gouel an uhelvar sakr ?... *Holl e chomont pof.* Perak ne bulluc'hont ket, gant o c'hurunou, ar groaz plantet war veg ar menhir en deus savet Briak e kichen e beniti, elec'h pulluc'han o ôteriou o-unan, evel dôlmen ar Gwrac'hed ? Diganit te, Konotek, ma mestr, am eus bet donézon ar skiant, ha diganit oun e gortoz da glevet ar wirione !

KONOTEK. — An doueou eo perc'hen ar wirione. An dud n'o deus diouti nemet eun damskeud berr ha touellus.

WOEDMON. — Dishenvel eo da gomzou hirie, Konotek,

diouz ar re a lavares, pa zaves da zorn dehou, diwar lein an dôlmen, evit diskouez d'imp an hent...

KONOTEK. — An hent-se am eus heuilhet, me ma-unan, ha setu me digoueet en eur pleg doanüs meurbet, elec'h ma c'hellan bean gwentet, evel eur blouzenn, en eun islonk ha n' anavean ket...

WOEDMON. — Desket 'teus d'in hanoiou ha henchou ar stered ; roët 'teus d'in da anaout ledander an douar hag al lezennou a c'houarn an natur ; met ouspenn a fell d'in...

KONOTEK. — Re bell e fell d'it mont.

WOEDMON. — Fellout a ra d'in gouzout piou on, a belec'h e teuan ha pelec'h am eus da vont. N'houllan ket bean, evel eun dall, kaset ha digaset tu ha tu, dre henchou ar vuhe... Sklêrijenn am eus ezomm ! Ro d'in ar sklêrijenn, Konotek, pe me a yelo d'he c'hask digant eun all.

KONOTEK. — Hag eo te a gomz evelse, te, Woedmon, hag am oa dibabet da vean drouiz-meur en em goude ?

WOEDMON. — Ya, me ! Burzudou, emezout, a zo c'hoarvezet, — war digare m'eo 'n em gavet an arne hag ar c'hurunou d'ober er c'horn-ze eus ar forest galvet Koad an Heïezed...

GWEZUK. — Gra d'ean tevel, Konotek ; dismegans a ra d'hon doueou !..

KONOTEK. — Nann ! Lezomp-han da gomz !

WOEDMON, *da Konotek.* — Petra sonjez eus ar burzudou a had Tual endro d'ean ? Kamm Occismor kavet ar c'herzed gantan ; aerouant Traou-Trekor tanfoeltret 'barz ar mor ; eun den maro digaset da veo ouz toull dor Lutesia ; eun den notet pareet e izili ; eur wreg paour torret he sec'hed d'ei gant eur feunteun varzudus. Testou 'zo, ha, mar kredez eur rumm, perak ne gredez ket ar rumm all ?

KONLAEDD. — Gra d'ean tevel, Konotek, ha kas anean kuit diouz hon zouez !

WOEDMON. — Mont a rin kuit, pa vo ar c'houlz ; chom a rin c'hoaz eur pennad, rak eun dever eo d'in... Gouët

ouzoç'h penôs an drouized, en hon rôk, o doa paouezet d'ober sakrifisou tud, dre m'o c'havent re gri...

KONOTEK. — Goût ouzomp se, met hirie an doueou, droug enné, abalamour da zismegansou an dud, a c'houlenn kasti, a c'houlenn gwad.

WOEDMON. — Gwad eur bugel !

GWEZUK. — Nemet gwad eur bugel dinoaz n'hall gwalc'hi an torfejou grêt.

WOEDMON. — Levanora n'he deus nemet eur mab.

KONLAEDD. — Warnan eo koueet ar brall ! Kenkouiz all e vije koueet war hon bugale-ni, hag hon dije sentet hep klemm ; hep rann-galon, avat, ne lâran ket.

KONOTEK. — Trawalc'h a gomzou ; n'hallomp ket dale pelloc'h. Te, Gwezuk, a gemero ar men lemm, kontel ar sakrifisou. Woedmon n'eo ket mat he dougfe ken. *Mont a reont, o fevar, erméz.*

DIVIZ II

BRAN-DU. *O tout dre eur wenojenn, a-zindan ar c'hoad. Kerzet a ra gorrek 'trezek an dôlmen ; en em harpan 'ra war hec'h ilin warnan, hag e chom eur pennad dilavar.*

BRAN-DU. — Neuze 'ta, gwir eo ? War ven an dôlmen, ar gwad a redo souden, gwad eur bugel ! Lavenora ? N'anavean ket ar plac'h-se... Koulskoude, e sav true 'nem c'halou o sonjal enni... Ar c'homzou oun o paouez da glevet a strafilh ma spered, evel, en peniti Langoat, komzou Koupaia. Woedmon a glask ar wirione... Me he c'hlsk eveltan... Pelec'h he c'haout ? Kazi ar gredenn am eus penôs an doueou-ze hag a gleven d'ec'h c'hoaz o komz dre an avel a c'houez war tonnou ar môr hag en deliou an dero, kazi ar gredenn am eus int deut mut. Mouez an avel a lâr d'in : « Gevier ! Gevier kement-se ! Gevier ive pep diougan a evurusted ! Pa ve tremenet ar goanv, an neve-amzer a zistro gant e c'hlsazur da wiskan pep gwezenn, da skuilh e vleuniou war ar brugeier ; met

en buhe an den, neve-amzer ebet ne deu warlerc'h ar goanv. *Gant kalon.* O neve-amzer ! neve-amzer skedus ma buhe ! Aman eo e teuan da glask da roudou ! Me eo a veze galvet gwechall, gant tud ar plou, koulmig wenn Brekilten... Maden e vleo aour, an drouiz kenedus, en doa staget e galon ouz kerden flour ma mouez... Aman, war ar men sakr, hon doa touet, dirak an doueou, bean an eil d'egile da viken... Levr an evurusted a zigoras evidomp e bajennou kentan... met a-boan digor, setu ma voe adserret... hag ez on chomet ma unan ! ma unan !... Hag ar goulmig wenn a zo bet troet en eur vran du, hag, aboue, biskoaz he mouez n'he deus kanet !... *Klevet a reer tud o kerzet dindan ar c'hoad.* — *Hi o chilaou.* Tud o komz er brouskoad ! *Sellet a ra hag e wel Koupaia ha Seva.* Hounnez ! hounnez bepred war ma hent !... Daoust ha red eo d'imp en em gaout ? *Mont a ra erméz dre an tu debou.*

DIVIZ III

KOUPAIA, SEVA, *o tout er c'hoad dre an tu klei*

KOUPAIA. — Ejened Deroch a ya hag a ya gant al laneg. Roue an Domnone en deus lavaret d'e genderv Tual : « Ar pez douar kelc'hiet gant an ero o devo toullet en eur vont, adalek sav-heol betek kuz-heol, a vo d'it en aluzenn eus ma ferz, abalamour da Zoue ».

SEVA. — Dija, Briak en deus savet e beniti demdost da lez ar Roue. Tual a gresko e vanati, hag ennan e teuo niver a dud yaouank da vevan dindan al lezenn zantel roet gant Patrik d'e vibien a Iverzon.

KOUPAIA. — Kichen ar manati-ze, eun all a vo savet evit an intanvezed hag ar gwerc'hezad gwestlet da Zoue. Ennout te, Seva, e fizian al labour-ze.

SEVA. — O mamm ger, chomet c'houi ganin-me, ma ne vo espernet netra eus ar pez a zo rekis 'vit eun ober ken bras.

KOUPAIA. — Nann, ma merc'h, ma reuz a zo achu. Hepdale, e vo fin d'an deiou en doa roet Doue d'in evit e serviji. E Langoat, 'n em feniti karet, e fell d'in 'n em lakaat e stad da vont dirakan.

SEVA. — Neuze 'ta, mamm, e renkin chom aman hep-dout? Pegen kalet e vo evidon an disparti!

KOUPAÏA. — Ha n'eo ket bet bras en hon c'henver madelez Doue? Ha n'en deus ket miret ac'hanomp, epad meur a vlâvez, da vevan an eil e kichen eben? Deut eo amzer an disparti. Red eo hen gouzanv a galon vat.

SEVA. — Bolante Doue bezet grêt!

KOUPAÏA. — Te ive, Seva, a heuilho reolenn Patrik gant gwir umilite, sentidigez ha paourente, evidout hag evit da c'hoarezed, ha gant karante evit ar re-all. Paour ebet o skei war da zor, ra ne dec'ho heb eun aluzenn; na den glac'haret ebet, hep bean frealzet!..

SEVA. — Mamm, pegwir e c'hourc'hemenez d'in, me a rei diouz dougen ar bec'h pounner a lakez war ma diou-skoa, ha gant evez e virin da genteliou!..

KOUPAÏA. — Ha neuze, p'en devo Doue roet d'in da anaout e vo deut ma eur diwezan, e kasin d'it ar c'helou, Seva, hag e hasti dont war ma zro, abalamour digemer ma bennoz.

SEVA. — R'az miro Doue c'hoaz pell amzer d'ar re o deus evidout doujans ha karante!

KOUPAÏA. — Ra c'hoarvezo ganin ar pez a blijo gant Doue. Lâr d'in hag-en n'eo ket aman omp pedet, gant da vreur Tual, d'hen gortoz war wrimenn ar c'hoad?

SEVA, *o sellet a bep tu.* — Marteze omp deut re bell. Ken brao eo bale dindan skeud an dero bras, en eur gêzeal eus Doue hag eus e volonte santel.

KOUPAÏA, *o sellet an heol, a-dreuz d'ar brankou.* — Setu an heol o verkan an navet heur eus an de... Tual ne dle ket dale ken, *o tôl evez ouz an dôlmen.* Sell! eun dôlmen... test ar c'hiziou fallakr bet gwechall er vro-man....

SEVA, *o sellet ouz an douar.* — Ar yeot a zo bet gwasket neve 'so... *O tostaat ouz an dôlmen.* Hag aze war an dolmen, eur hanap hanter-c'houllo, eur vouc'hal vein a ziskoue 'zo bet tremenet aman tud o chom, marvat, 'barz er c'hoad.

KOUPAÏA. — Eveldomp e karont disheol an dero bras. Met, diwezat eo, Seva. Ha ne welez ket da vreur Tual

o tont dre eur wenojenn bennak? *Seva a ya hag a deu, o sellet dre belec'h e teufe Tual.*

DIVIZ IV

KOUPAÏA, LAVENORA, ha goude BRAN-DU

Lavenora a deu war al leurenn, enkreziat bras, hag a ya, he dremm en he daouarn, d'en em harpan ouz eur wezenn, evel eun den et en dizesper.

KOUPAÏA, *o tôl evez outi hag o vont d'he c'haout, leun a zousder.*
— Gwreg, perak e ouelez te?
Lavenora ne respont ket. Bran-du a deu ermêz eus ar c'hoad.

KOUPAÏA, *ouz he gwelet.* — Te aman, Bran-du?

BRAN-DU. — Ya, met bez dinec'h, Koupaïa, n'on ket deut gant komzou treut ha kasaüs da stlepel ganit, dirak ar vaouez-man o ouelan. He foan a zo re vras 'vit ma c'hallfe he disklêrian d'it. Me a gomzo eviti.

KOUPAÏA. — He anaout a rez?

BRAN-DU. — Oun o paouez klevet he hano evit ar wech kentad.

KOUPAÏA. — Piou eo?

BRAN-DU. — Lavenora, eun Armorikanez eus ar ouenn dud a zalc'h an draouienn distro, gwaskedet, eus tu an hanter-noz, gant koat Brekilien. Da genderv, ar roue Deroch, gant e holl c'halloud, n'eo ket bet evit argas ac'hane an drouized. Eno e renont c'hoaz.

KOUPAÏA. — Neuze, an dolmen-man?...

BRAN-DU. — Eo ar men sakr a reont warnan lidou ar Gelted, lidou ar relijion goz on chomet stag outi. Setu perak on distroët aman, me, bugel ar c'hoajou, hag am eus renket... Met da betra komz d'it ac'hanon-me?...

KOUPAÏA, *o tostaat outi gant kunvelez.* — Evit ma c'hallin kemer perz en az poan, mar d'out poaniet...

BRAN-DU. — Naun. *O tiskouez Lavenora.* Petra eo ma foan-me e kenver hini houman? Ha ne teus ket klevet doare ebet eus an tan-gwall spontus en deus devet eur c'horniad eus ar c'hoad?

KOUPAÏA. — Eo. Eus Tour ar Roue, ar gedour en deus galvet d'an tan, kerkent ha m'en deus gwelet ar moged. War ar run distro, Koad an Heizez a flamme 'vel eur pikol tantad...

BRAN-DU. — An drouized a lavar penôs an tan-ze a zo eur sin eus kounnar an doueou. Ha gallout a ran disklérian d'it ar wirione penn-da-benn ?

KOUPAÏA. — Perak e c'houlennet ze diganin ?

BRAN-DU. — Abalamour eo da vab Tual a damallont da vean bet kiriek da zrouk-rans an doueou.

KOUPAÏA, *gant true*. — O tud diboell ! N'ouzont ket petra lâront !

BRAN-DU. — Da vab, gant e gomzou divergont, a zo kiriek ma renk mab ar wreg-se mervel !

KOUPAÏA, *o juntan he daouarn, he zellou d'an nenv*. — Nann... Nann ! N'eo ket 'ta, o ma Doue, ne lezfet ket...

BRAN-DU, *o troc'han ar gomz d'ei, tér*. — Lâret am oa d'it ne deuje ganin komz trenk ebet... Met santout a ran ma gwad o virvi !.. Klev 'ta, da vab eo a zo kiriek da varo ar bugel-ze !

KOUPAÏA. — Petra lârez ?

BRAN-DU. — Gwad a zo red evit terri kounnar an doueou. Ar brall a zo koueet war Gouvig, bugel Lavenora... Ha breman, goulenn digant ar wreg-se, mar kredez hen ober, petra 'zo kiriek d'he daerou ? *Bran-du a dec'h kuit*

DIVIZ IV

KOUPAÏA, LAVENORA

KOUPAÏA, *o pedi a greiz he c'halon*. — O Doue, diskoue d'imp, me az ped, da c'halloud divuzul ha da vadelez hep par. Te hag a rentas he mab da intanvez Naïm, mir a bep droug mab ar vaouez-man ! Chilaou ouz ma fedenn ! Ma vo enoret da hano, o Doue, ha ma vo salvet ar re, ha goude gwelet burzudou da c'halloud, a deuo da lakaat o fiars ennout !

Koupaïa a ya betek Lavenora a zo breman stouet, he dremm goloet a zaerou, ouz an dôlmén.

KOUPAÏA, *gant dousder*. — Lavenora ! *Krenvoc'h, o stokan d'he skoa*. Lavenora !

LAVENORA, *o sevel he fenn, hag o selllet ouz Koupaïa*. — Piou out te ?

KOUPAÏA. — Eun estranjourez ; met eur plac'h hag a gav war he hent eur gonsortez glac'haret, daoust ha ne zant ket he c'halon o tomman outi, evel ouz eur c'hoar ?

LAVENORA, *gant dizesper*. — Lez ac'hanon ! Forz na pa ve ken tener da galon ha m'eo flour da vouez, n'hellez ober vad ebet d'in ! Dalc'h gant da hent, ha chans d'it ! Ma lez gant ma glac'har !

KOUPAÏA. — Nann !... Rak eun dra bennak a c'hallan hag a dlean ober evidout.

LAVENORA, *o binjan he fenn, gant eur vouez leun a enkreiz*. — Ma mab, ma Gouvig paour, ha gallout a rez hen renti d'in ?... Tennan anean a-zindan ar gontel a dle hen diwadana, aze, war ar men ?

KOUPAÏA. — Gallout awalc'h, marteze !

LAVENORA. — Petra lârez ? Arabad sorc'henni eur vamm !

KOUPAÏA. — Ma gir a roan d'it.

LAVENORA. — Oh !

KOUPAÏA. — Iskis a gavi ma c'homzou, rak n'anaveez ket an Doue a azeulan... Holl-c'halloudek eo hag holl-vadelezus !... Bez fiars ennan ha bez direc'h. Gouvig ne varvo ket...

LAVENORA. — Ma mab, ma mabig ! A vefe d'in rentet beo ! Aze, etre ma diourec'h ! Kemend all a levenez goude ken gwaz auken ! Ha gwir e vefe ? Kaout a ra d'in 'n em santout eun tammik diboaniet !... Kredi 'ra d'in klevet, en em c'hreiz, eur vouez hag a lavar : « Bez fiars, hag ar pezh a teus c'hoant a c'hoarvezo ! »

Tud eus ar plou en em gav 'benn al lidou. Koupaïa a grog e dorn Lavenora hag a gas anei ganti a-goste, en tu dehou, war diarôg an teat.

KOUPAIA. — Deus ! ha forz petra c'hoarvezo, bez fiants bepred ! bepred !...

DIVIZ VI

KOUPAIA, SEVA, LAVENORA, BRAN-DU
AN DROUIZED, GOUVIG, AN DUD

Gwezuk a gerz arôk, gantan, ouz an dorn, Gouvig gwisket e gwenn, hag eur gurunenn bleuniou war e benn ; goude, Konlaedd ha Konotek. Woodmon zo eun tammik war o lerc'h hag a deu d'en em lakaat e tu klei, ha diarôk d'an teâtr ; Bran-du, eur pennad goude, en em lak demdost da Woodmon. Tôt evez a reont piz ouz kement a c'hoarte. Gouvig a wel e vamm hag o lezel dorn Gwezuk, e teu d'en em deurel etre he diou-vrec'h. Pokat 'ra houman d'ean gant eun deneridigez vras, hag en em lez da gouean war eur men, o terc'hel anean bepred etre he diou-vrec'h.

GOUVIG. — Mamm ! Mamm ! Sell 'ta pegen kaer deus gwisket ac'hanon ! *Diskouez a ra e zaë gwenn hag e gurunenn.*

GWEZUK, *o tont da gât Lavenora, goustadik* : Mir anean ganit war da zaoulin... Roet hon deus d'ean louzaouenn ar c'houked... E kreiz hunvreoù kaer e varvo, ha n'en do poan ebet. *Gwezuk a dec'h.*

KOUPAIA, *o tont da gât Lavenora.* — Ne varvo ket ! Fians ! Fians !

Lavenora, o pokat d'he mab gant mall d'hen dibri, a wel e zaoulagad o serri. An holl a chom dilavar, o sellou troët war-zu ar bugel. A-benn eur pennadig :

KONOTEK, *da Wezuk.* — Deut eo ar c'houlz !

GWEZUK, *da Lavenora.* — Kemer kalon, gwreg !

Kemer a ra Gouvig etre diou-vrec'h e vamm, immobiluet gant ar glac'har ; houman ne stourm ket ; Koupaia en em lak etrezi hag an dôlmen, elec'h ma weler astenn Gouvig bepred kousket.

KOUPAIA, *da Lavenora.* — Bez fiants ! Fians bepred ! Doue a viro d'it da vab !

KONOTEK, *en e zav en tu debou d'an dôlmen.* — En enor d'an doueou, hag evit silvidigez ar bobl ! *Da Gwezuk, goustadik* : Sko ! sko !..

DIVIZ VII

AN HEVELEP RE, TUAL, LAOUENAN

Gwezuk a ya da zevel ar gontel, pa 'n em gav Tual, en e zorn eur vaz hir, eur groaz war ar penn. Laouenan a zo gantan. Dont a reont dre an tu klei hag e chomont a-zav, kichen an dôlmen.

TUAL, *o sevel e zorn debou.* — Evit gloar Doue ha silvidigez ar re a gred ennan !

An drouized boëmet a souz ; Gwezuk a zalc'h e dôl. Woodmon ha Bran-du a heuilh talarek ar pez a dremen.

KOUPAIA, *da Lavenora, n' he deus gwelet netra, he fenn ganti pleget en he bruched.* — Deus, da vab a zo rentet d'it !

LAVENORA, *'vel o kas kuit eun hunvre poanuis, a glask gouzout petra dremen Mont a ra warzu an dôlmen, leun he c'halon a levenez, hag e krog en he mab bepred kousket, nemet e tihun a damm da damm* : Gouvig, Gouvig, ma bugel !

BRAN-DU, *da Woodmon.* — Picù eo an Doue-ze hag a zo bepred trec'h d'hon re ?

TUAL. — Hennez eo an Doue krouer an nenv hag an douar, ar mor hag ar stered. Hen en deus savet ar me-neiou ha kompezet an traouiennou. N'eus Doue nemetan ; an nenv eo e drôn ; pep den, war an douar a dle hen azeuli hag hen karout. N'houl ket eus ho sakrifisoù ; gwad e Vab Doue eo a vo skuilhet hiviziken war an Oter evit dasprenan ar bed. Doue, rentet gloar d'ho hano, en eur gemer true ouz ar bobl-man, ha roet d'ei, gant ho sklêrijenn, gras ar silvidigez.

TOLENN IV
Maro Koupaïa

(Diavéz henvel ouz hini an dôlenn arôk)

ROLLOU :

TUAL,	SEVA,
LAOUENAN,	MALHELEW,
GAÏK,	BRAN-DU,
MOALIK, mesaër bihan,	HERA,
TORT-BRAS,	OWEN,
BLEIZ KOZ,	GWENN,
AR BAOUREZ KÉZ KOZ,	ALÉNOR,
KOUPAÏA,	PRITELLA.

Pa zav ar ridoch, n'eus den war al leurenn. An evned a gan. Benn eur pennad, Malhelew a dremen gant eur pod o vont d'ar feunteun. Eur pennad adarre. Neuze, eo Moalik a deu dre an tu klei, eur boked spern-gwenn en e zorn. Chom a ra a-zav, en eur digouezout, hag e sell piz ouz peniti Koupaïa.

MOALIK. — A-boan ma tarz an de... Mouile'hi ha pinsined a gan er brouskoajou... Ar bleun a zigoro lagad a bep tu... Nag eo kaër ar beure !.. Ha gwir eo eman ar santez o vont da vervel ? Mervel ! *Azean'ra war eur men.* Mervel ! Lâret deus d'imp eo ze pignal dreist d'ar stered, betek ti Doue... Met mervel, ze 'zo ive lezel war e lerc'h, war an douar, ar re hokare hag a oa karet ganec'h. *Eur gammed bennak a ra warzu ar peniti, hag e sell ouz an nor.* Ah ! c'houi blije d'in, Itron Koupaïa ! Pa dremenec'h dre al lanneg elec'h ma vezen gant ma gever, e santen 'vel eur bennoz

otiskenn warnon ha war ma loened ! « Hirie e vo mat ar bed ganimp, » a sonjen ! — Ha setu m'oc'h o vont da vervel ! An itron Seva he deus lâret... N'ho kwelin ken ! Ah ! pegen trist e vo hon flou hepdoc'h !

SEVA, o tont eus ar peniti. — Te 'zo aze, mesaër bihan ? Ken abred fete ?

MOALIK. — Ya, Itron Seva.

SEVA. — Perak eo ken trist-se da zellou, Moalik ? Klevet 'teus ar c'helou ive ?

MOALIK. — Ya, itron Seva, ha kement he c'haran, hon mamm vat Koupaïa !

SEVA. — Kalz a ouelo hirie eveldout-te, bugel... D'in-me he deus difennet gouelan war ar pezh a zo eviti eun eurvez evurus... Mar welfes pegen seder eo ar mousc'hoarz war he muzellou !.. Vel pa vije dija er Baradoz !..

MOALIK o pedi. — Gwelet a rin anei c'hoaz, n'eo ket 'ta, itron Seva?... Mont a rin goustadik hag e lakin ouz he zreid ma boked spern-gwenn?... Kement e kare ar bleunioù-man, perlez kurunenn hec'h Roue, emezi...

SEVA, he dorn war skoa ar bugel. — Ya, gwelet a ri anei c'hoaz. Eman breman he spered beuet en Doue, o pedi hag o c'houlenn eur c'hras c'hoaz arôk kuitât an douar, kaout bennoz he mab kent mont d'ar bed all. 'N eur dont er beure-man, war gât ar peniti, Moalik, ha ne teus ket gwelet, a-bell, eskob Lantreger o tont etrezek aman ?

MOALIK. — An Otrou 'n Eskob ? Nann, itron Seva, ne zellen ket 'trezek an hent-se ; ma zellou a dalc'hen war gribenn an dervenn vras a zo o waskedi ho peniti. Met setu aman Gaïk a deu war draon gant hent ar manati.

SEVA. — Hen am oa kaset, arôk goulou-de, da gât ma breur... Met e-unan eman ! Daoust ha Tual a vefe o prezek war ar mêz, en eur c'horn bennak eus an Dominone ? Koulskoude, e vaman a zo en gortoz anean. Fians am eus e roio Doue d'ei he diwezan mennad.

DIVIZ III

AN HEVELEP RE, GAIK

GAÏK, *berr warnan*. — Redet am eus, Itron Seva, rak gout a ouien ho poa hast d'am gwelet.

SEVA. — Petra lâr an Eskob ?

GAÏK. — Dont a rei, itron, ha setu aman e gomzou : « Lavar d'am mamm ec'h oferennin eviti kerkent ha tarz an de, ha goude, hepdale, ec'h in betek d'ei. Doue a roio d'in ar c'hras d'he gwelet c'hoaz war an douar. Kerz ha kas d'ei ar c'helou-ze ». Hag on deut.

SEVA. — Bennoz Doue, Gaïk. 'vit ar pezh teus grêt evidomp, evit ar boan a teus kemeret ! *Lakaat a ra lêz en eur skudell, hag he c'hinnig d'ean*. Karout a rajen rei d'it, 'vit terri da sec'hed, gwelloc'h evit lêz bon gever.

GAÏK, *oc'h evan*. — Gwell eo ganin evan al lêz-ze en eur skudell bri, eget ar gwin gwellan e kalur eur roue.

Seva a ya er peniti. Gaïk a aze war eur men.

DIVIZ IV

MOALIK, GAIK, TORT-BRAS, BLEIZ KOZ, AR BAOUREZ KEZ KOZ

TORT-BRAS. — Ha gwir, eo prest an Itron da vervel ? Neuze, avat, ni 'varvo ive, gant an naon, pa ne vo ken aze da bourchas bara d'imp !

BLEIZ-KOZ. — Ha gant ar riou, er goanv' de, pa ne vo ken aze d'hon gwiskan !

AR BAOUREZ KÉZ. — Paour kèz, petra deufomp-ni da vean !

GAÏK. — Ha n'ho peus ket a vez o komz evel ma ret ? Pa 'man ar maro o vont da zamman an Itron, eo ennoc'h hoc'h-unan e sonjet da gentan ?

TORT-BRAS. — Ar re a chom warlerc'h eo ar gwasan d'è.

BLEIZ-KOZ. — Stlejan e baourente dre an henchou, evel eur fagodenn spenn, hag a vroud ac'hanoc'h noz-de...

AR BAOUREZ. — Nem santout trec'het, hep sikour ebet, gant an drouk-izili... Brao eo d'it, Gaïk, ober da bôtr faro ; n'ouzout ket c'hoaz petra eo kosaat...

TORT-BRAS. — Deski a rei evel ar re-all, abred pe diwezat...

BLEIZ-KOZ. — Brao eo d'it komz eus poan ar re-all, te hag a ve gwelet er Yeodi o pesketa an eog war da vag neve !

DIVIZ V

AN HEVELEP RE, -HERA, OWENN, GWENN, ALENOR, PRITELLA

HERA, *o tont gant Owenn*. — Arsa, penôs e kredet-hu en em dabutal evelse, *o tiskouez ar peniti*, aman ?

GAÏK. — Gwir eo. Klevet awalc'h a rafe ac'hanomp, an itron gêz, hag a zeske d'an holl en em garout, kentoc'h c'hoaz dre skouer evit dre gomzou !

BLEIZ-KOZ. — Ze ne harzo ket e vanko bara d'imp hirie, war digare eman ar maro aman ouz an treujou.

DIVIZ VI

AN HEVELEP RE, MALHELEW

MALHELEW, *a deu ernêz eus ar peniti gant eur banerad bara. D'an Tort-bras*. — Nano, ma mignon, n'efet ket d'ar gêr, gant ho sac'h goullou. An Itron Koupaia he deus roet urz da zigas d'ec'h ar bara-man. *Rannan ra ar bara etreze*.

OWENN, *da Valhelew*. — Lâr d'in 'ta, Malhelew, hag-en n'eo ket gwellaet d'an itron en noz tremenet ?

MALHELEW, *o rei bara, a binj he fenn*. — Ne wellao ket d'ei ken, er bed-man da vihanan. N'eman ket o klask se ive !

HERA. — Ah ! ni hen goulenn eviti, ni hag a vo ken glac'haret gant he maro !

OWENN. — Ha sonj a teus, Malhelew, pa deuemp aman da ze-ki ganti gwirioneiou santel ar relijion ?

HERA. — Hi a oa karget gant Doue d'hon c'helenn ha d'hon ren.

ALENOR. — Hi a oa bepred prest da gemer hon foanvou 'vit o skanvaat.

GWENN. — Ha ne welfomp ket anei eur wech c'hoaz ?

DIVIZ VII

AN HEVELEP RE, SEVA, HA GOUDE KOUPAÏA HA BRAN-DU

SEVA. — Eo ; kement a c'hoant he deus ha c'houi. Deut eo an eur da gimiadi... Ar vamm, kent o c'huitât, a fell d'ei rei he bennoz d'he bugale...

Seva a ya er peniti. Eur vouel a zo lemet, hag e weler, en eur e'hoste, ar gwele dister m'eo astennet warnan Koupaïa. — Pep hini, herve e roll, a heuilh gant evez ar pezh a dremen. An holl a zo tavedek... Koupaïa a a zell oute. — Ar mesaër bihan a dosta stok d'ar gwele. Lakaat a ra Koupaïa he dorn war e beun evel d'hen binnigan. — Bran-du a deu dre an tu klei hag a chom eur pennad difinv, o sellet ouz Koupaïa. — Koupaïa a zell outi ive hag a ra sin d'ei gant he dorn.

KOUPAÏA, *da Vran-du, a vouez izel.* — Deus, Bran-du, deus ! Bran-du a deu gorrek hag a chom 'n he sav ouz troad ar gwele. Deus... Tostoc'h !... Bran-du a dosta hag en em dôl d'an daoulin ; Evidout-te ive, Bran-du, eo deut an eur, eur Doue. Sellet a ra endro d'ei. Oc'h aze holl ?

BRAN-DU, *a zell, 'vel o klask unan bennak.* — Ha Bredakh, al laourez, perak n'eman ket aman ?

KOUPAÏA, *o tiskouez an nenv.* — Er baradoz eman... n'hon rôk... o c'hortoz ac'hanomp... holl !

DIVIZ VIII

AN HEVELEP RE, LAVENORA, GOUVIG

Lavenora, Gouvig ganti heli an dorn, a deu ebarz dre an tu klei hag a ya da zaoulinan ouz troad gwele Koupaïa.

SEVA, *o tiskouez Koupaïa.* — He mouez a zo re dister da c'hallout bezan klevet ganec'h holl. *O kemer eur parch.* Setu aman an alioù diwean he deus grêt d'in lakaat dre skrid evidoc'h. *Lenn a ra, Koupaïa war evez o chilaou.* « Ma bugale muian-karet, Doue am galv davetan. Pedet evidon, pa vin tremenet ; me 'bedo ive evidoc'h. Bezet fidel da Zoue ; karet-han eus a greiz ho kalon ; diwallet d'an wazi anean dre ar pec'hed ; en em garet an eil egile ; an neb en deus kalz, rannet gant an neb en deus nebeut.

Ha te, Breiz vihan, douar dibabet dreist d'ar re-all, te hag a zo deut da vezan c'hoar Enez Veur ar zent, mir dinamm da fe ha da fiars er C'hris t Doue. Dalc'h start d'Ean, ha desk, ouz troad ar Groaz a zav dija he diou-vrec'h 'us da gribenn da goajou ha war da ôchou, desk diganti mervel kentoc'h evit nac'h da fe. Ha breman, kenavo, ma bugale muian-karet ! Kenavo d'ar bed-all. Kenavo !

Koupaïa a ra sin ar groaz warnê ; Seva a zalc'h he brec'h. Ar re 'zo wardro a dle bezan eveziek ; darn a dorcho o daoulagad.

OWEN, *da Goupaïa.* — Ra vo bennoz Doue war da eur diwezan, te hag e teus tremenet da vuhe oc'h ober vad d'imp-ni !

TORT-BRAS. — Bennoz Doue warnout, te hag e teus roet bara d'imp, pa hon doa naon.

KAMM. — Bennoz Doue warnout, te hag e teus pourveet dilhad da c'holo hon izili skornet.

LAVENORA. — Bennoz Doue warnout, te hag e teus, dre da bedenn galloudus, rentet d'in Gouvig, ma mab muian-karet.

BRAN-DU. — Bennoz Doue warnout, te hag e teus bet d'in, digant Doue, gras ar sklêrijenn.

Tual a zigoue dre an tu klei, e-pad ar c'homzou-ze, hag a deu dirak gwele Koupaïa.

DIVIZ IX

TUAL, LAOUENAN, 'n e zav drek-kan.

TUAL, oc'h astenn e zorn da vinnigan. — Ha bennoz d'it, Koupaia, ma mamm, 'vit an holl garante 'teus bet skuilhet warnon ! Bennoz d'it da vean roet da Zoue ar mab a c'houlenne diganit ! Bennoz d'it, ma mamm, ha ra chomo ma bennoz warnout da viken ! *Mont a ra betek troad ar gwele, hag e tro warzu an dud.* Et breman, breudeur muiankaret, et da bedi eviti hag hon lezet holl gant Doue !

Holl en em dennont, war o fouez, an eil goude egile, o sellou war Koupaia o vervel, hag e pozout eun tammik, ardek kuitat al leurenn-c'hoari. Seva ha Malhelew a zaoulin e kichen Koupaia. Houman a lak eun dorn war benn pep hini evit eur bennoz. Int a dec'h da ziwezan. Tual a chom e-unan gant Koupaia. Tostaat a ra outi, ha rei eur pok d'ei war he zal, ha goude, e chom en e zav en he c'hichen ; diskouez a ra an nenv :

TUAL. — Ha breman, mamm, komzomp eus ar Baradoz.

(Ar ridoch a goue a-benn eur pennad)

LID-ENOR

Tölennoù evel en arvest kentan. — Ar mor. — War gribenn ar gwagennoù ha war ar gerreg, èle, dispak o iskili. E kreiz al leurenn, bodet war eur garreg, Sant Tual, an uhelan. — E tu dehou d'ean, Sant Goneri ; izeloc'h, dirakan, Santez Liboubana, e vamm. E tu klei da Sant Tual, Santez Koupaia, e vamm ; diraki, izeloc'h, Santez Seva, he merc'h. — Sant Tual, en eskob, mintr war e benn, ha kroaz en e zorn. — Sant Goneri, gant ar c'hazul korniek, giz koz. An ter Santez, gwisket evel Rouanezed, kurunennou war o gouelioù. — Pa zav ar ridoch, sklérjenn c'hlas. — Muzik flour. — Goude, sklérjenn wenn. — Kan. — Merc'hed yaouank e gwenn, gant koefou bras, a dremen dirak ar zent a chadennad, 'n eur ganen : *Fe hon tud koz* : Kentan, pevaret, pempvet ha naonet koublad, hep diskant (N^o 97, *Kantikou brezonek*).

Da fin ar prosesion, an holl goleier a lintr war an dro. Ar merc'hed, a bep tu d'al leurenn, e doare ma vo gwelet mat Sent hag èle.

An dud, en o sav, a gân : *Bro goz ma Zadou*.

TOLENN

I. Koupaia o tigouezout en Arvorig	5
II. Peniti Koupaia e Langoat	18
III. Drouized Brekilien	35
IV. Maro Koupaia	46
V. Lid-enor	52

